

Imbabourch

Niverenn 76
30 Ebrel 1976

IMBOURC 'H, KELAOUENN BOLITIKEL

Seizhvet bloavezh

Niverenn 76

30 Ebrel 1976

Kemenn.....p.237
Degouezh an U.D.B.(kentañ lodenn).....p.239
Penaos e steuzias ar Feiz katolik
hengounel e Kembre er XVI-XVIIvet
kantved.....p.249
JIL EWAN.- En donvor da Vreizh : un
nebeut resizadurioùp.289

Koumanant-bloaz : 35 lur. KRP : Y. Ollivier,
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant
e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 10 lur. Ar pennadoù a
zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-B^Urloud,
35 000 Roazhon. CPPP : 50 015.

KEMENN

Dre maz eo re stank an danvez adarre (en abeg d'ar studiadenn diwar-benn steuziadur ar Feiz katolik e Kembre er XVI-XVIIvet kantved) hon eus ranket gourzezañ embannidigezh an "Notennoù diwar-benn politikerezh hag armerzh." Moulet e vint en niverenn a zeu, war un dro gant kendalc'h troidigezh levr Dom Louis Gougaud diwar-benn ar "C'hristeniezhoù keltiek".

Goulenn a reomp start adarre digant ar goumananterion ha n'o deus ket kaset c'hoazh o adkoumanant evit ar bloaz-mañ henn ober hep dale.

Trugarez dezho en a-raok.

+++++

Adal miz Gwengolo e teuy er-maez ur rumm stagadennoù : ANTIGONE troet diwar ar gresianeg gant Youenn OLIER. Ur reuzc'hoari AN DISKOULM DIWEZHEL gant Youenn OLIER. Ivez troidigezh ul lodenn eus an DIVINA COMMEDIA eus DANTE, aozet gant Per BOURDELLES : AN IFERN.

Priz ar stagadennoù-mañ a zo : 10, 20 ha 30 lur. Ar re a gar a c'hell rakprenañ.

+++++

DEGOUÉZH AN U. D. B. (kentañ lodenn)

Skrivet em boa e-barzh niverenn miz C'hwrevrer IMBOURC'H em dije arsellet en eil lodenn ar pennad am boa gouestlet d'ar strolloù politikel breizhat degouezh an U.D.B. o klask gouzout ba bez' e c'hell ar strollad-mañ c'hoari roll ur strollad broadel e Breizh.

Tro hon eus bet da venegiñ an U.D.B. meur a wech er gelaouenn-mañ. Lennerion zo o deus rebechet ouzhimp bezañ techet da vurutellañ betek re obererezh ar strollad-mañ ha gwir eo moarvat ez eo c'hoarvezet ganeomp diskleriañ ne blije ket deomp an intrudu-mañ-intrudu kemeret gant an aozadur pe izili zo anezhañ war dachenn ar skritur, lakaomp, ha merket hon eus ivez ne oamp ket a-du n'eo ket hepken gant e linenn bolitikel hogen ivez a-zivout kraf al linenn bolitikel en emsav, dre vras. Padal e ve arabat krediñ ez omp enebet dre bennaenn hag ent reizhiadek ouzh ar strollad-mañ. N'omp ket enebet outañ nag a-du gantañ muioc'h eget n'omp enebet ouzh ar strolladoù all, nag a-du ganto. N'eus forzh penaos n'eus er mare-mañ aozadur ebet e Breizh hag a glotfe e baliou gant an obererezh a fell deomp ren e par an emsav ; dre ne c'hellomp ket erbediñ da zen harpañ da vat hini ebet anezho. Bez' e c'hell unan merzout koulskoude hon eus atahinet ar strollouigoù kleiz-elour pe zehouelour breizhat krisoc'h eget n'eus c'hoarvezet ganeomp burutellañ an U.D.B., lakaomp.

Kent ensellout degouezh an U.D.B. enta e fell deomp ober div evezhiadenn. Da gentañ n'hon eus ket studiet a-walc'h istor na politikerezh an U.D.B. evit gellout barn en un doare

reizh ar strollad-mañ ; d'an eil, daoust maz eo an U.D.B. an aozadur brezhon siriusañ, war a lavar an holl, e chom e nerzh dister e pep keñver, - n'eo ket hepken e-keñver ar strolladoù gall 'c'hwec'hkognek' hogen e-keñver strolladoù broadel an tremened e Breizh, S.B.B. e-pad ar brezel, lakaomp. Merk ar Wask a roy tu deomp da varn. An "Heure Bretonne", lakaomp, a denne 35.000 skouerenn bep sizhun, tra ma ne denn ar "Peuple Breton" nemet 8.000 skouerenn bep miz. Evit "Pobl Vreizh", tennañ a ra 1.500 skouerenn, war a gredan ; padal, ur gelaouenn evel "Dihunamb" a zeuas er-maez etre 1904 ha 1944 a denne war-dro 2.000 pe 3.000 skouerenn ingal bep miz (hag a-wechoù 10.000) netra nemet evit brezhonegerion rannvro Erec'h ; "Arvor", e-pad ar brezel, a voule 2.000 skouerenn bep sizhun. Kement-se a verkan, n'eo ket evit tamall eveljust, nemet evit diskouez eveljsut da baotred an U.D.B. emañ Yann pell diouzh e gazeg evit c'hoazh ha d'ar re n'emaint ket en U.D.B. ez eus gwell d'ober eget tagañ ar strollad nemetañ hiziv an deiz hag a zerc'houez an emsav dirak ar foran e Breizh. Lod a zouj bezañ mac'homet gant an U.D.B. en deiz m'he devo kemeret ar galloud e Breizh ; ma teu an diougan-mañ da wir un deiz bennak, n'eo ket warc'hoazh beure e c'hoarvezo rak, siwazh, lodek eo an U.D.B. e reuzeudigezh hollek an emsav ha gwan e chom an aozadur-mañ evel aozadurioù all an emsav pegen parfet hag urzhiet bennak e vefe a-hend-all.

Pezh a fell din lavarout da gentañ eo ne c'heller ket sellout ouzh an U.D.B. evel ouzh un danvez strollad gouarnamant e Breizh, war verr dermen, da vihanañ ha se hon eus diskleriet er pennad gouestlet da "Wengel ar sokialouriezh" e-barzh niverenn dibenn bloaz IMBOURC'H. Ar mennoz-se dres eo a glaskimp diorren da gentañ

War a seblant, kemeret he deus an U. D.B. an hent ez eo aet gantañ "Plaid Cymru" un hanter-kant vloaz bennak a zo, da lavarout eo, hini ar stourm lezennel kempennelour, nemet moarvat, gant ur spered abafoc'h eget Plaid Cymru a rae anezhi hec'h unan ur Strollad broadelour, ha gant ul linenn sokialour a-gleiz a glote gant saviad an emsav ha Breizh dre vras marteze e 1964 hogen n'he doa ster ebet e Kembre e 1925.

Meneget hon eus ar vroadelouriezh. Stadañ a c'hellomp ne ra an U.D.B. dave ebet da geal ur vroad vrezhon nemet evel pal pe zisoc'h diwezhel hec'h obererezh. Padal en diskleriadenn orin embannet da geñver diazezedigezh ar Strollad e reer anv eus "galvedigezh Vreizh da zont da vezañ ur vroad" ; mennoz krouerion an aozadur e oa moarvat e oa didalvez derc'hel kont en o bruderezh eus ur c'heal ha na glot ket c'hoazh gant saviad gwirion Breizh ha n'eo ket degemeret mat gant an dud e Breizh. Dre vras enta en deus an aozadur-mañ lezet a-gostez penn-da-benn dodenn ar vroadelouriezh daoust m'en em ziskouez houmañ bep an amzer, a-wechoù e ser an dilennadegoù zoken (kv. embannadenn an emstriver a-berzh ar Strollad e Roazhon, nevez zo, Y. Rouger, da skou-er).

§§§§

Bezef pe vezef, hent al lezenn hag ar gempennouriezh dibabet gant ar strollad evel an hini o klotañ gant saviad pobl Vreizh hiziv an deiz ne c'hell oatre dezhañ c'hoari ur roll politikel pouezus a-walc'h a-raok ur rummad pe zaou. Ma varnomp diouzh skouer Gembre pe Alba (er broioù-se end-eeun ez eo damheñvel ar saviad politikel ouzh hini Breizh) e c'hellomp gwiriañ ez eus bet ranket gortoz an dek vloaz diwezhañ ken na vije dilennet an danvez kannaded kinniget gant ar strolladoù broadel. Dre se ez eo arabat bezañ en gortoz e vije dilennet kannaded U.D.B.

a-barzh ar bloavezhioù 1990-2000, ha c'hoazh ma ne vez ket skoilhet ar strollad-mañ gant strolladoù kleizour pe a-zehoù dezhañ o kevezad gantañ war an dachenn foran e par ar stourm brezhon ; rak sklaer a-walc'h eo en deus dastumet an aozadur-mañ e-kerzh an dilennadegoù diwezhañ mouezhioù ar vrogarourion dre vras ha n'eo ket hepken ar re anezho a-zo a-du gant e linenn bolitikel a-gleiz.

Ha c'hoazh ouzhpenn, pa vo bet tizhet an amkan-se - kas un nebeut kannaded da "Gamb'r ar Gannaded e Paris - en em gavo ar Strollad pell a-walc'h diouzh ar pal en deus merket dezhañ hag a zo kemer ar galloud e Breizh.

§§§§

O c'hortoz ar mare-se e chomo saviad an U.D.B. bresk ha diasur he peurgent e degouezh un emgav dispac'hel e Breizh. Dre m'he deus kroaziet evel "Plaid Cymru" war bep rakwel dispac'hel e vefe sammet kuit ur seurt aozadur ivez ma teufe d'en em ledañ e Breizh un argerzh a feulster bennak a dennfe da grouiñ ur gumuniezh politikel e Breizh dre an nerzh. Moarvat e c'heller soñjal n'en defe ur seurt argerzh chañs ebet da zisoc'hañ ma krogfe da vont en-dro ; ha war ar gredenn-se dres ez eo diazezet "peoc'helouriezh" dilavar an U.D.B. Hogen lakaet e fellfe d'an U.D.B. kemm hec'h unan he folitikerezh ha kemer un intrudu bennak e sell d'ur stourmerezhañ taeroc'h eget an hini a zo renet ganti ne c'hellfe henn ober nemet oc'h en em zivodañ koulz lavaret.

Meur a abeg a zo d'an dic'halloud-se. Unan anezho a zo koshadur ar frammoù moarvat. Emañ pennañ renerion an U.D.B. o tostaat diwar vremañ ouzh o daou-ugent vloaz hag en arbenn a se n'eus ket da soñjal e vent gwall dentet gant avantur ebet ; adlavarout a raimp e tiskouez an

an dibab o deus graet e 1964 e felle dezho pel-laot diouzh ar feulster romantel.

§§§§

Ur wech klevet enta ez eo awenet an U.D.B. gant ar vroadelouriezh pe, da vihanañ, ar vrogarouriezh (distaolet he deus an elfennoù kleizelour etrevroadelour, gall avat e devoud, a oa en em silet enni war-lerc'h 1968) ha klevet ivez ne vo ket gouest da gemer ar galloud e Breizh a-barzh bloavezhioù hir e sav hiziv ar goulenn evit pep brogarour breizhat hag a zo, da gentañ brogarour, ha ne zle ket harpañ an U.D.B. Seul naturoc'h e vo dezhañ respont d'ar goulenn-mañ maz eo c'hwitet an arnadoù da sevel strolladoù dehouelour pe gleizelour breizhat evel m'hon eus diskouezet e lodenn gentañ ar pennad-mañ.

Kemer a raimp degouezh ar vrogarourion gristen e Breizh peogwir e klask ar gelaouenn-mañ eztaoliñ savboent darn eus ar re-mañ. Daoust ha bez' e c'heller seurt brogarourion emezelañ en U.D.B. pe harpañ anezhi er mare-mañ hag er stad m'emañ an traoù ?

Gwiriañ a c'heller, da gentañ, ez eus kristenion en U.D.B. Anv a reer anezho a-wechoù e kelaouennoù ar strollad. Hiziv an deiz a-hend-all ez eo degemeret gant pennadurezhioù an Iliz - diouzh ma chom ganto un tamm beli ha ma taoler evezh ouzh pezh a lavaront - ez eo dieub ar gristenion da zibab ar 'sokialouriezh' evel uhelvennad politikel. Me 'gav din enta o deus ar gristenion pep frankiz war an dachenn-se. Pezh na c'heller ket ar gristenion degemer avat - anez paouez a vezañ kristen - ez eo ar varksouriezh en he c'hevaniezh evel kelennadurezh politikel-prederouriezhel ha, diouzh un tu all, ur stourm etre renkadoù ar loupet ha fanatek a vefe awenet gant un doare gouennelouriezh (an

dra-se a c'hoarvez e broioù bet gounezet d'ar sokialouriezh hogen ivez e-touez stourmerion zo eus ar gostezenn gleiz, - kristenion zoken hag a nac'h zoken saludiñ ur c'hristen eus an tu-dehoù, o plegañ evel-se d'ur fanatikouriezh hon eus diskuliet meur a wech ; hogen war an destenn-se e tistroimp ur wech all) ; ne c'hell ket ar gristenion kennebeut darbenn ul linenn bolitikel a zegasfe anezho da zaskoriñ pep galloud d'un ardivink stadel a vefe etre daouarn tud estren pe enebour d'o feiz (ne lavaran ket ez eo hemañ degouezh an U.D.B. a zo pell diouzh ar galloud, evel m'hon eus merket ; hogen parañ a c'hellfe hevel-ep dañjer gant ar strollad-mañ pe ur strollad all a vefe mennet - ha tost - da gemer ar galloud e Breizh ; evit ar poent, n'eus forzh penaos, ez eo re zizunvan an U.D.B. ivez evit bezañ arvarus er c'heñver-se, hiziv bepred.)

§§§§

O vezañ pezh ez eo an U.D.B. evit ar poent enta - un talbenn urzhiet evel ur strollad - nemet e-lec'h e kej stourmerion a bep seurt, broadelourion ha rannvroelourion, kleizourion ha kleizelourion, dispac'herion ha kempennelourion, unanet evelkent - spi hon eus - en-dro da benn-aenn galvedigezh Vreizh da vezañ ur vroad hag ul linenn bolitikel a-gleiz (daoust ma n'eo ket termenet resis houmañ), hep kelennadurezh spis avat (al luganoù a gemer he lec'h 'm eus aon) ne welomp abeg mat ebet da zizaliañ d'ar vrogarourion gristen a fell dezho ren dreist-holl ul labour a vruderezh brogar ha sokialour war un dro kenlabourat gantañ hag emezelañ ennañ zoken, seul vui maz eo distanet sektennouriezh a-gent ar strollad (skoret eo "Skoaz-ell Vreizh" gant an U.D.B. a zifenn diwar vremañ ar brizonidi bolitikel e Breizh) ; diouzh un tu all, erfin, n'eus mar ebet ez eus ezhomm eus un U.D.B. kreñv evit mirout ouzh an danvez stourmerion yaouank dedennet gant ar sokialouriezh a

a zianken e geunioù ar gleizelouriezh-anarkouriezh, barnet d'an dizurzh ha d'an dic'halloud, da vezañ atoret a-benn ar fin gant aozadurioù gall.

§§§§

Un dra eo avat evit kristenion e Breizh harpañ ur strollad politikel gouest da skignañ ar mennoz broadel ha da zifenn-lazoù ar werin er vromañ, hag un dra all en em reiñ d'un aozadur a vennfe bezañ un doare Iliz pe, en a-raok, un doare Stad ma tlefe an holl vuhez politikel vrezhon bezañ dastumet enni ken e rankfe pep kudenn bolitikel h.a. bezañ diskoulmet enni hepken. Hemañ a oa tech E.S.B. ergentaou ha, dre vras, ez eo hini ar Strolladoù komunour bet kemeret ar galloud ganto dre ar bed. Kredet hon eus diverzout an tech-se ivez en disentez kemeret gant brezhonegerion an U.D.B. diwar-benn ar skritur. N'hon eus netra da abegañ a-zivout an diskoulm roet gant an U.D.B. d'ur gudenn a yezh o sevel e diabarzh o strollad. Spi hon eus hepken ne soñj ket ar stourmerion o deus degemeret seurt diskoulm ez enouestlont drezañ un danvez Stad vrezhon da zont !

§§§§

An abeg pennañ hon eus avat da soñjal ez eo koulz d'ar vrogarourion gristen a-du gant ar sokialouriezh ha douget d'ar bruderezh emezelañ en U.D.B. hon eus displeget meur a wech endeo : dizunvan a-grenn eo ar gristenion war dachenn ar politikerezh ha steuziet eo an Iliz evel nerzh politikel, e Breizh, da vihanañ. War ar marc'had n'eo ket hepken ar gristenion a hiniennoù a zo rannet kenetrezo e par ar politikerezh met an Iliz dizunvaniezh he reuz e rez ar Feiz hec'h unan hag ar geleennadurezh relijiel ken e c'heller en em c'houlenn a-wechoù ha talvezout a ra c'hoazh un dra bennak da unan embann ez eus anezhañ ur

c'hristen, - hep komz eus bezañ ur c'hatolig).

Lakaomp enta e fellfe da gristenion vrezhon en em strollañ kenetrezo evit kas war-raok ur stourm politikel, petra a c'hoarvezfe ? Da gentañ e rankfent gouestlañ o holl amzer d'un obererezh politikel a vefe durc'het, marteze, d'an tu-dehoù ha d'ar virelouriezh hogen na servijfe ket da galz tra d'an Iliz e Breizh. Rak an dalc'h a zo aze : an Iliz hec'h unan eo a zo da adsevel e Breizh ha kement-se a zlefe sellout kement - ha da gentañ holl - ouzh kristenion an "tu-kleiz" ha re an "tu-dehoù". Ar pezh a zo da c'houlenn enta digant ar gristenion a zo enouestlet en UDB, lakaomp, n'eo ket dilezel er maremañ an U.D.B. hogen chom hep sellout ouzh ar stourm politikel rik e Breizh evel ar pep pouezusañ. Kounent a-hend-all n'eo ket ar politikerezh un obererezh neptu hogen ez enouestl, dre ret ivez, tonkad an Iliz hec'h unan ; a-se ez eo o dlead dezrannañ o obererezh politikel e sell da lazoù un danvez Iliz da adsevel e Breizh e degouezh ur Vreizh dishual ha sokialour, lakaet e vent broadelourion ha sokialourion.

Betek henn ne welan er vro-mañ kristen ebet nag en U.D.B. nag e strollad all ebet a ve e chal da ren hevelep dezrann ; an holl anezho ne reont nemet adlavarout luganoù politikel hag heuliañ ul linenn bolitikel dinec'h kaer diwar-benn dazont an Iliz malavaront aparchantiñ dezhi (gwir eo : peseurt Iliz ivez, a-benn ar fin ; hogen se a vefe da dermeniñ dezho, n'eus forzh penaos, evel kristenion atebek) ; ne reont goulenn ebet dezho o unan diwar-benn dazont ar Feiz hag an Iliz en ur gevredigezh sokialour (moarvat, pe ne gredont ket re er gevredigezh-se, pe n'int ket gouest da dermeniñ anezhi ervat). Evel ar stourmerion yezhelour e kredont emichañs ez eus er Feiz un elfenn vurzhdus a varrekay anezhi da badout da viken. Padal ez eo anat e c'hell an Iliz mont da get en hor bro evel er C'hornog

dre vras a-raok fin ar c'hantved-mañ ; hag a-hend-all, ne dalv ket ar boan mirout ur Feiz hag ur Yezh a vefe hepken un albac'henn hiniennel hep dazwered na levezon ebet war ar sevenadur hag ar gevredigezh en o fezh. E gwirionez, n'eus er maremañ eus ar gristenion en hor broioù nemet tud varv o touarañ tud varv.

Ur striv a breder a ranko bezañ renet enta, da gentañ, gant ar stourmerion vrezhon enouestlet er politikerezh evit termeniñ penaos erank bezañ stuziet ur gevredigezh evit chom digor d'ar Feiz (ar sokialouriezh - hag houmañ ivez a vefe da dermeniñ - ne oufe bezañ un uhelpal drezi hec'h unan d'ar gristenion, dreist-holl ma ne ra, a-benn ar fin nemet kreñvaat galloud ar Stad).


§§§§

D'ar re all, d'ar re na fell ket dezho harpañ an U.D.B. na strollad politikel all ebet ez eo an hevelep dezrann da ren ivez. Klask a raimp en ur pennad all displegañ savboent ar re-se, o vurutellañ arvezioù zo eus emzalc'h politikel an U.D.B. a vir outo a gemer ur perzh oberiant ha padus en hec'h obererezh ha klask a raimp gwelout ivez peseurt tachenn eus ar stourm breizhek a c'hellfe bezañ miret dezho ha na gevezfent ket warni er maremañ gant an U.D.B.

Y.O.

(Da genderc'hel)

=====



ABATI TINTERN

Klokaet e vo ar pennad-mañ da heul gant ur studiadenn all diwar-benn an adreizh prtes-tant metodistat e Kembre en XVIIIvet hag en XIXvet kantved.

Laouen e vefemp o kaout addisplegoù pe breder-iadennoù al lennerion e sigur ar studiadenn a embannomp en noverenn-mañ.

++++
DISTAGADUR AR C'EMBRAEG. C=K Y= EU e deroù ur ger,
I en dibenn. F=V FF=F TH ≠ Z w=OU & W
U= I digor, tost d'an U.

KARTENN KEMBRE

(kontelezhioù)



PENAOE E STEUZIAS AR FEIZ KATOLIK
HENGOUNEL E KEMBRE ER XVI-XVIIvet
KANTVED

Blenskrid : saviad Kembre en hanterenn
gentañ ar xvi vet kantved

Evel ma ouezer, n'he deus bet Kembre intrudu ebet en disivoud a zo c'hoarvezet e Breizh-Veur er XVIvet kantved. Dre ma oa bet damesaet gant rouaned Vro-Saoz adal an XIIIvet kantved ha dreist-holl ar XVvet, enframmet en diwezh er rouantelezh saoz dre lezenn 1536 an hini eo e voe troet Kembre d'ar brotestantiezh. Evel m'hon eus merket e-barzh hon "DAMSELL WAR ISTAR KEMBRE", dizunvan tre e oa dezvad Kembreiz hervez ar rannvroioù ma aparchantent dezho. Pal ar rouaned a ligned Tudur e voe unvaniñ an dezvadoù-se ha su-jañ holl Gembreiz d'an hevelep lezenn, pezh a voe graet war-bouez embann lezennoù 1536 ha 1542 a dregemmas penn-da-benn reizhiad-varn ar vro. Diwar neuze e voe krouet an "AZEZ-MEUR" a zeuas da vezañ uhelensav al lezenn saoz e Kembre, ma oa gougevanet outañ "cherifed" ha "barnerion-a-beoc'h". Diouzh ar steuñv lakaet da dalvezout gant rouaned Vro-Saoz Edouard IV hag Edouard VII e voe diazezet ivez ur "c'hKENGOR AR GOROR" (da lavarout eo : "Kengor an harzoù") ma voe astennet ar gembeli anezhañ betek peder c'hontelezh tostañ Kembre (isurzhiat e oa ar c'hengor-se, eveljust d'ar "c'hKEVRIN-GENGOR" ha da "LEZ AR STERENN" e Lunden, ha reolet ganto). Ennañ avat en em gave ugent ezel anvet gant ar roue, darn anezho eskibion e Kembre pe e kontelezhioù tostañ Kembre, holl avat leal

ouzh ar gurunenn saoz, eveljust. Renet e oa bet ar c'hengor-se, da gentañ, gant an eskob Rowland Lee ; da c'houde e oa deuet William Herbert, kont Penfro, e mervent Kembre, da vezañ al levier anezhañ ; amsavet e voe hemañ gant Seur Henry Sydney, e 1559, a oa unan eus tud desketañ e amzer, ur Saoz, nemet douget da Gembre hag a zastume, da skouer, dornskridoù kembraek kozh (un eilskrid diwar LEVR RUZ HERGEST a oa en e gerz). Hemañ a oa un den seven, disheñvel a-walc'h diouzh an eskob Lee a oa bet gouest, moarvat, da ziuennañ laeron ha forbannedel ledenez, ha d'ober eus Kembreiz, a-hervez, tud seven, o sentiñ ouzh al lezenn (n'o devoa ar re-mañ skiant ebet anezhi, a-ziagent, sañset bepred) hogen a oa ivez un den taer ha kriz, peurgent pa voe anv a lakaat da dalvezout al lezennoù a-enep d'ar Gatoliked,

Klaskomp avat taolennañ un tammig dre ar munud urzhiadur dezvel Kembre er XVIVet kantved. Lavaret hon eus e oa an 'Azez Meur' ('Se-siwn Fawr') pennañ ensav dezvel ar vro. Anvet e oa e saozneg 'The King's Greal sessions in Wales'. Dindan e veli e oa dastumet an daouzek kontelezh eus Kembre e-barzh pevar c'helc'h-parzh, teir c'hontelezh e pep hini anezho. Dizalc'h e oa an 'Azez Meur' e-keñver lezioù Westminster hag en em vodañ a rae div wech ar bloaz o chom c'hwec'h devezh e pep kontelezh nemet e hini vMynwy a fellas d'ar Saozon derc'hel bepred a-ziforc'h diouzh ar peurrest eus Kembre ; el lez-varn-se e ranked kaout ur jubennour, anat a-walc'h eo, rak kembraegerion un-yezh a oa eus Kembreiz d'ar pred-se.

Evit enframmañ gwelloc'h poblañs Kembre er rouantelezh saoz e oa bet deroet ur perzh-iadur politikel bennak da gendereoù zo. Pep kontelezh he doa ar gwir da zilenn ur 'Marc'heg' enta, daou e Mynwy, hini ebet avat e Meirioneth,

hag ouzhpenn un ezel eus ar Parlamant e Lunden. Er pleustr e oa miret ar c'hargoù-se d'an uhelidi a gave brud ha fred e Lunden ; eno e vezent saoznekaet buan hag atoret gant ar Stad saoz ; gounidus e oa ar c'hargoù-se ivez, na petra, hag heligenta a veze etre ar vrientinion evit o zapout.

Tamm ha tamm e oa bet diorreet an amaezhiadurezh saoz e Kembre ha klotañ a rae an diorreadur-se gant kresk ar galloud saoz, evel dres ; bez' e oa anezhi, da gentañ, un araez da gorvoiñ ar vro ha da vrasaat peadra ar Stad saoz. Karget e oa ar 'cherifed', da skouer, da brientiñ gweladennoù ar varnerion-gezurzh e lez ar gontelezh hag e lez ar bourc'hioù hogen, ivez, da zastum an tailhoù evit ar gouarnamant saoz. Dalc'het e oa ar c'hargoù-se gant personed (ul leve mat a oa stag outo ha bez' e ranked paeañ ker evit o c'haout : war-dro kant lur saoz).

Ar c'hargoù a varner-a-beoc'h a oa dalc'het gant noblañsoù lec'hel "dynion da eu gair a'u clod" ; eizh anezho a oa e pep kontelezh. Bez' e tegouezhe d'ar barner-a-beoc'h ur galloud amaezhiadurel ha na oa ket e piaou ar cherif. Bezet pe vezet, dre ar reizh-se e voe atoret 'bonez' ('noblañs') ar vro gant ar Stad saoz.

Un ensav gwirel all a ranker menegiñ : hini Lez an Endon a oa fiziet ennañ lakaat e talvoud al lezennoù diwar-benn kravez ha buhezegezhvat (serriñ an tavarnioù da sul, berzañ ar c'hoarioù e-pad ar servij en Iliz diazezet h.a. h.a.)

Kreizennet hag urzhazet strizh e oa ar reizhiad amaezhiadurel, o reiñ tu d'ober galv a zivar an ensav a-is betek an ensav a-us. An 'Azez-Meur' avat a c'hoarie roll an ensav-adv'hervel pennañ e Kembre, - hag er-maez eus Kembre, e Lunden, Lez ar Sterenn a varne ar vac'homerion o tennañ korvo eus o amaezhioù evit gwaskañ ar poblañs. E devoud avat ez eo bet breinet ar gevred-

igezh kembreat a neuze gant diazezidigezh ar reizhiad amaezhiadurel soaz er vro, dreist-holl avat ar vrientinion, eveljust:ar re-mañ a oa bet prenet war-bouez pourchas dezho kargoù a bep seurt gant ar mererezh saoz. Ur skrivagner kembraek a daolenn evel henn gwall stad ar gevredigezh kembreat a neuze :

"Sell ouzh doare ar bed ha glac'haret e vi, ken bras c'hoant o deus an dud da draoù ar bed-mañ, d'ar perc'hennañ douar, aour, arc'hant ha pinvidigezh, - ma ne gejer nemet gwall zibaot a wech gant ar fiziañs e Doue.

Beuzet eo Kembre dindan c'hoantegezh ar bed rak petra eo ur garg nemet ur c'hrog da ba-kañ e amezeg... Maner an denjentil ned eo nemet ur maner a laeron..."

~~~~~

An deskadurezh hag ar sevenadur e

Kembre

Ret e voe adurzhañ ar reizhiad-skoliañ e Kembre dindan ren an dTudured. Gouzout a reer e oa bet divodet ar manatioù gant ar roue Herri VIII; ouzh ar manatioù-se avat e oa stag skolioù hag a oa kreizennoù a sevenadurezh latin ha kembraek e pep lec'h e Kembre. Evel ma oa ezhomm a skolioù, n'eus forzh penaos, e voe dav sevel re nevez. "Skolioù yezhadur" a voe graet anezho. Peurvuiñ e voent diazezet e-barzh kêrioù, - lakaomp e Bro-Saoz, e Redec'hen ('Oxford'), Westminster, Eton, St-Albans. Er skolioù-se n'oa tamm kembraeg ebet eveljust met muioc'h a chañsoù o doa ar studierion, - mil anezho eus Kembre etre 1571 ha 1621, a-wechoù bugale tud vunut, - da ober berzh e Bro-Saoz. Muioc'h a breder a roed d'an deskadurezh e Kembre eget e Bro-Saoz d'an ampoent, pezh na oa ket souezhus en ur vroad chomet paour hag isdiorreet, evel ma oa Kembre e-keñver Bro-Saoz d'ar mare-se. Techetoc'h e oa Kembreiz da c'hortoz kargoù digant ar vesletradurezh saoz eget ar Saozon o unan a oa douget muioc'h d'ar c'henwerzh ha d'na armerzh.

Al labour - douar

Daoust ma kreskas gorread an douaroù aret e chomas Kembre er XVIvet kantved ur vro a saverezh-loened, stank enni ar peurvanoù. An darn-vuiñ eus ar gouerion a veze diwar emvezezezh, hep ober implij eus ar mounreiz nemet etre miz Mae ha miz Du, da vare ar marc'hadoù pa veze gwerzhet ar chatal. A-hend-all e veze graet trokerezh gant an dud diwar ar maez. Diasur ha dizingal e veze an eostoù hag ar gernez a reas he reuz meur a wech e-pad ar c'hantved-se, e 1518, 1528, 1551, 1586, 1587. Gwashaet e voe stad ar gounezerezh gant gwall-arver ar bonez a vroke an douar. An dudjentil uhel hag izel a greskas o leve-douar da, sabatuiñ e-kerzh ar XVIvet kantved, o tibradañ houmañ eus dek lur betek kant, tri-c'hant ha pemp-kant a-wechoù. Gant an arc'hant o devoa rastellet e savjont kestell ha manerioù a lorc'h, e maen; ilizioù avat ne savjont ket evel ma reas Breizhiz en hevelep grez.

~~~~~

ORIN AN DISIVOUD

Gouzout a reer e voe Herri VIII kiriek da zisrann Iliz Vro-Saoz diouzh Roma. E 1527 edo ar roue o klask dibriediñ ha kas kuit e wreg kentañ, Katell a Aragon. Padout a reas an enkadenn etre 1527 ha miz Ebrel 1533, pa aotreas arc'heskob Caergaint ('Canterbury'), Cranmer, Herri VIII da zibriediñ. D'ar c'houlz-se e tistaolas Herri VIII dreistbeliezh ar Pab hag embann a reas e oa anezhañ e unan diwar neuze penn an Ilizer rouantelezh.

E-pad un nebeut bloavezhioù, koulskoude, e kendalc'has Kembreiz da zegemer dreistbeliezh ar Pab, o kemer disentez ar roue saoz evit ur froudenn. Ar barzh Lewis Morgannwg, e-touez re all, a nac'has touiñ al le a lealegezh; unan eus pevar eskob Kembre a reas kement-all: George de Attica.

E-touez al liked hag ar gloer izel ez enebas un nebeudig a dud, John Hale, da skouer, a savas e vouezh evit diskleriañ e tlee Kembreiz en em unaniñ gant Iwerzhoniz a-enep d'ar Soazon; hevelep mennoz a oa embannet gant Philip ap David ap Ledo hag ar beleg Robert ap Roger Heuston a voe herr a-walc'h evit diogeliñ en doa ar Roue dilezet ar Feiz : harzet ha karc'hariet e voe kerkent. Dre vras, koulskoude, e plegas ar veleion hag ar venec'h hep klask herzel e nep doare. Ret eo lavarout e oa eus an eskibioñ 'tarnwazerion' roue Bro-Saoz ha ne c'hellent ket kaer enebiñ ; skouer fall a roent a-hend-all d'ar veleion blaen a oa dizesk hag a chome paour (en abeg da vrezelioù ar XVvet kantved, peurgent) ; n'oa ket mat buhezgezh ar re-manñ meur a wech : 43 anezho a oa dimezet en eskopti Bangor en hanternoz Kembre e deroù ar XVIvet kantved. Evit ar venec'h, n'oant ket e-tailh da herzel ouzh ar galloud politikel ; re aes e oa o zizhout peogwir e oa a-walc'h divodañ o manati evit o lakaat en dienez. Padal e oa karet an Iliz hag ar venec'h gant ar varzhed (1) ; savet e oa bet meur a iliz nevez, ha kempennet re gozh, war-lerc'h brezel ar Rozennoù.

+++++

Ar manatioù distrujet

Lavaret hon eus ne enebas ket ar venec'h. E gwirionez e vije bet diaes dezho rak a-barzh pell e voent skignet ha strewet a bep tu

 (1) Ar varzhed Gruffydd ap Ieuan ap Llywellyn, marv e 1518, Tudur Aled, marv e 1526, ha Rhys ap Thomas a voe katoliked c'hredus hag a chomas feal d'o feiz betek ar penn, ugent vloaz war-lerc'h dibriedadur ar Roue saoz ha distagidigezh an Iliz saoz diouzh Sez Roma.

skrapet o douaroù diganto ha distrujet o annezioù.

Thomas Cromwel, kuzulier ar roue, en doa grataet dezhañ ur wreg nevez hag ur veli glok war an Iliz ; prometet en doa ouzhpenn ober anezhañ ur roue pinvidik mor war-bouez daskoriñ dezhañ glad ar manatioù en e rouantelezh. Stank e oa avat ar manatioù e Kembre. Abred o doa ar Veneadidi graet o annez e Ewenni hag e Mynwy, en Abergafenni hag en Aberhonddu ; Sistesiz o doa en em staliet e Ystrad Fflur, Ystrad Marchell hag e-barzh dek annezadur all. A-hend-all e kaved e Kembre skouroù eus Abati Cluny e Bro-C'hall, - Eostenidi hag Ospitalourion. Brudet mat e voe an holl venec'h-se e Kembre betek an diwezh. Sammañ a raent ur roll kevredigezhel pouezus gant ar skolioù a oa dalc'het ganto hag ar sikour a roent d'an davan-teion . PRIOLDI Caerfyrddin, da skouer, a veve 80 a beorion ha kement-all a c'hoarveze e-lec'h-all. Gwazerion ar roue saoz Thomas Cromwel ha Pollard, peurgent, a ouie kement-se hogen se ne barras ket outo a breizhata an ensavadurioù iliziek-se a heligenta. Ma ! An holl vanatioù, dezho ul leve disteroc'h eget 200 lur a yeas da gargañ yalc'h ar roue Herri VIII ; tri hepken a badas en tu-hont da dri bloavezh war-lerc'h an disentez kement gant ar roue d'o divodañ. Da vat e voe kaset kuit ar venec'h etre 1536 ha 1538 habiskoazh ken diwar neuze ne voe tro d'o adsevel e Kembre, eveljust.

+++++

Emled an disivoud e Kembre

Daoust ma n'en doa graet ar roue Herri VIII nemet seveniñ an disrann etre an Iliz saoz ha Sez Roma, hep degemer evit keloù se tezennoù ar Brotestanted bet burutellet gantañ en un oberenn e latin - evit se e oa bet roet dezhañ an titl a 'fidei defensor' gant ar Pab e unan, - e reas kloer zo, bet gounezet da gelennadurezh ar Brot-

estanted hag enebet ouzh ar Pab evit abeg pe abeg, o mad eus an degouezh-se evit diskar ar Feiz katolik hengounel e sigur skarzhañ diouti ar falskredennoù. Kroget e voe diwar neuze da zistrujañ delwennoù ha relegoù ar sent. E Llandderfel e voe diskaret evel-se un delwenn vras savet en enor da Sant Derfel end-eeun, ma terede davetañ pirc'h-irined e-leizh rak gouest e oa, hervez ar brud, da dennañ an eneoù eus an ifern. Eskob Tyddewi, pennañ sez eskob ar vro, a reas un anv dezhañ e unan o pleustriñ ar vicher-se, koulz hag an Doktor Elis Prys. Padal ne oa ket glan rik gred an daou zen-mañ, emichañs, rak, war a lavarer, e rejont o mad eus ar gefridi o doa sammet evit kargañ mat o chakodoù.

+++++

An adreizh relijiel dindan ren
Edouard VI e Bro - Saoz (1547-1553)

D'ar c'houlz-se en em gave Thomas Cranmer, kuzulier kozh ar roue Herri VIII e penn an Iliz e Bro-Saoz, hag eñ arc'heskob Caergaint ('Canterbury'); kuzulierion ar roue a oa anezho ivez Protestanted emskiantek hag a venne diskar ar Feiz katolik hengounel en ur zistrujañ an dafar lidañ kozh : kantolorioù, skeudenoù, delwennoù hag int oc'h embann a-hend-all levrioù-pediñ nevez, damgatolik a-wechoù o doare, nemet oc'h argarzhiañ an oferenn. Kement-all en doa graet William Salisbury e kembraeg pa oa bet skridaozet gantañ levrioù-pediñ kefridiel a-berzh an Iliz Stadel e 1546 hag e 1551. Al levrioù-se avat a chomas dizimplij e-pad un dek vloaz bennak, pezh a ziskouez ne oa ket kustumet ar boblañs ouzh al liderezh nevez. Padal, war un dro, e veze breutaet diwar-benn Sakramant an Aoter, beleion dimezet, delwennoù ha pirc'hirinajoù, kevuniañ dindan an daou spezh h.a. Saviad an dud

a feiz a oa diaes a-walc'h e Kembre pa n'ouient ket re vat pelec'h edo ar wirionez, - pe gant ar relijion gozh pe an hini nevez, evel m'en diskouez ar "c'hkewez" savet gant ar barzh Sion Brwynog "Y ddwy ffydd" ("an div feiz") pe flemmskridoù Owain ap Gwilym diwar-benn ar veleion dimezet ha gwan o feiz.

+++++

Tro - vat diwezhañ ar relijion gatolik

Ar rouanez Mari a renas etre 1553 ha 1558 he devoa 38 vloaz pa gemeras lec'h Edouard VI. En abeg d'hec'h orin hanter gembreat e voe gwelet mat da gentañ e Kembre. Sion Brwynog, bet meneget uheloc'h a rae anezhi "Merch o dir Mon" (Mon a zo an enezenn vras eus gwalarn Kembre peuz stag ouzh ar c'hevandir); hag ouzhpennañ a rae da heul :

"Wele fraint y saint yn neshau - eilwaith wele 'r hen fferennau..."

('Setu brient ar sent o nesaat adarre; setu an oferennoù kozh...')

Moarvat e oagwirion ar rouanez o klask adsevel ae Feiz Katolik hogen se a reas en un doare nac'hus, diboell ha kriz, o heskinañ ar Brotestanted. Kement-se avat ne gargas ket en-dro ar manatioù goull, aet da greskiñ yalc'had ar roue hag e servijerion; ne leunias ket an ilizoù goull hep beleion; ne vroudias ket gred ar veleion dizesk ha dizurzhet o buhezegezh a-wechoù (c'hwezek anezho dimezet adarre en eskopti Bangor d'ar c'houlz-se).

Un evezhiadenn a c'heller ober evel-kent e sigur arnod ar rouanez Mari. Ne oa ket diazet mat ar relijion brotestant e Kembre dindan he ren rak ne voe merzheriet disivouder ebet er vro d'ar mare-se. William Salisbury a rankas tec'hout hag en em guzhat; Richard Davies a repuas e Frankfurt, en Alamagn; un hanter dousennad all a Gembreiz a zidec'has d'an douar-bras; setu holl.

Da lavarout eo, trubuilhet e voe nebeutoc'h a dud e Kembre eget e Kernev-Veur, lakaomp, a zo un tamm mat bihanoc'h, en abeg d'o feiz protestant.

+++++

Distro an disivoud

Evit ezhommoù he folitikerezh e kavas ar rouanez Elsbed aesoc'h hag emsavoc'h distreiñ d'ar brotestantiezh. Ne reas ket diouzhtu, moarvat, hag e-pad ur pennad e voe kendalc'het da ganañ an oferenn. Deuet mat e voe Elsbed enta da Gembreiz chomet katolik, seul vui ma talc'he soñj ar re-mañ eus orin kembreat he zilu. Adal deroù ar bloaz 1559, avat, ez embannas ar rouanez div lezenn a dermene dezvad ar gravez en he rouantelezh. Unan anezho a voe graet anezhi "al lezenn diwar-benn dreistbeliezh" ("Act of supremacy") a isurzhie Iliz Vro-Saoz d'ar gurunenn saoz. Miz war-lerc'h e teuas er-maez ul lezenn all : "lezenn diwar-benn unstummerezh" ("Act of uniformity") a redie ar gloer da ober gant levr-pediñ Edouard VI hag a c'houlenne diganto plegañ d'ar reizhiad nevez.

An holl eskibion a nac'has degemer al lezennoù-se, nemet daou, unan anezho o vezañ Kitchin, eskob Llandaf e Kembre ; hiniannoù eus ar veleion a nac'has ivez nemet war ar maez e rank-jont sentiñ buan, dre ma oa dav dezho, na petra, gounit o bara (reoù zo, marteze ivez, ne gomprenent ket pervezh ster an div lezenn nevez). Ne ouzer ket resis, n'eus forzh penaos, pet beleg a zistaolas ar reizhiad nevez e Kembre ; er rouantelezh saoz en he fezh avat ne voe diskarzhet nemet 2% anezho evit un embann a feiz katolik.

Un toullad beleion desket eus Kembre a glaskas repu neuze war an douar-bras : an Dr. Morgan Phillipps, eus kontelezh vMynwy ; Owen Lewis, mab ur c'houer dieub, eus Mon ; Rhosier Smyth, bet troet gantañ e kembraeg an oberenn c'hallek "Le théâtre du monde" ; Morys Clynnog

a vije bet anvet da eskob Bangor, panevet marv ar rouanez Vari ; erfin, Gruffydd Robert, ar gramadegour kembraek brudet h.a. Tud a dalvoudegezh e oa an holl Gembreiz-se ha meur a hini anezho a dapas kargoù uhel en Iliz ; Owen Lewis a voe eskob Cassano ; Gruffydd Robert a voe chaloni en Iliz-veur Milano ; Morys Clynnog a voe evit ur pennad, 'diwaller' ar skolaj saoznek e Roma.

Darn all eus ar Gatoliked a chomas er vro en ur guzhat o mennozioù : Thomas Bulkeley, eus Llanddeusant, e Mon (1543-1579) ; Humphrey ap Richard, eus Llanbeulan, Robert ap Hugh Hogen, o vezañ ma oa deuet en-dro an eskibion brotestant war-lerc'h marv Mary e voe dav d'an uhelidi - hag int o selaou an oferenn ez prevez en o c'hestell - mont d'ar servij protestant. E 1569, da skouer, e nac'has Seur Edward Stradling, eus Castell Sain Dunwyd sinañ an diskleriadur, hogen pa voe goulennataet gant kargidi ar rouanez e respontas ez erbede d'e verourion mont d'ar servij kefridiel nemet ne c'helle-eñ ket sinañ gant ur goustiañs sklaer an diskleriadur diwar-benn an'dreistbeliezh'. Re all, peogwir e oa aesoc'h dezho hag a-du gant o lazoù-int, a droe penn-da-benn d'ar brotestantiezh evel Seur Sion Salbri, bet gwarezour karmeziadezed Dinbych. A-benn ar fin enta ne chomas katolik nemet an noblañsoù bihan a veve war ar maez, pell diouzh ar c'hêrioù. Ar re-se c'hoazh a c'helle hepkoriñ ar servij kefridiel, barrek ha ma oant da baeañ an tell-kastiz a samme ar re na bleustrent ket an iliz stadel.

Ret eo lavarout a-hend-all e oa gwall izel saviad ar gravez e Kembre etre 1550 ha dibenn ar c'hantved. An eskibion brotestant a-du gant an adreizh a oa nec'het e 1563 (1) dre ma rae an diouiziegezh hag ar brizhkredenoù o reuz e-touez

(1) Lv. Al levr "Perl mewn adfyd" embannet e kembraeg gant ur protestant d'ar c'houlz-se.

ar werin ; klemm a rae Nicholas Robinson, eskob Llandaf, e 1569, a-zivout dallentez ar gloer. Kement-se ne oa ket souezhus peogwir e oa manet ar werin hep bugul ebet e-pad tost hanter-kant vloaz. Evel m'hon eus merket a-hend-all, ne ouie ket re vat Kembreiz peseurt relijion a oa dezho ; e 1570, da skouer, e veze lidet c'hoazh douaridigezhioù hervez ar c'hiz katolik hengounel, gant kantolioù h.a. A-benn ar fin ez eo bet dilezet ar gatoligiezh gant ar peb brasañ eus ar boblañs hag hep gouzout re dezhi hec'h unan d'ur mare bennak etre 1560 ha 1570, etre al lezenn diwar-benn an "unstummerezh" hag eskumunidigezh ar rouanez Elsbed gant ar Pab e 1570 end-eeun. Dav e oa d'an dud - ha rediet e oant zoken - mont d'un ofis relijiel bennak.

Betek 1570 ne oa ket bet heskinet ar Gatoliked da vat ; a-walc'h e oa d'ar rouanez ur c'hemplegerezh a-ziavaez. An eskumunugadur, avat, a zieube sujidi ar rouanez eus o le a lealegezh en he c'heñver ; ober a rae enta eus ar gatoliked danvez emsavidi. Diouzh un tu all ivez, ez irienne lod eus Katoliked Vreizh-Veur - ha Kembreiz en o zouez - a-benn erlec'hiañ ur rouanez katolik ouzh Elsbed ha lakaat, peurgent, Mary a Skoz en he flas war dron Bro-Saoz. N'eo ket souezhus enta m'he deus klasket ar rouanez Elsbed mougañ a-grenn kement dilerc'h eus ar gatoligiezh a c'helle chom en he rouantelezh.

+++++

An arnod evit adc'hounit Kembre d'ar Feiz katolik

E gwirionez, e-pad bloavezhioù kentañ ren Elsbed e oa brudet Kembre evit bezañ katolik hogen e Roma ne oa ket meizet mat e oa ezhomm ple-diñ en un doare arbennik gant ar vro-se evit difenn pe adsevel ar Feiz enni ; forzh penaos ne oa anezhi nemet ul lodennig vihan - nebeut anavezet -

eus ar rouantelezh saoz hec'h unan.

Padal, adal trederenn diwezhañ ar XVIvet kantved e voe klasket urzhiañ un enep-argad katolik e Kembre hag e Bro-Saoz. Ur skolaj a oa bet diazezet e Douai, en "Izelvroioù" a neuze, gant tri Fredenour ma oa daou anezho Kembreiz : an Dr. Owen Lewis, eus Mon, hag an Dr. Morgan Philipps, eus Mynwy. Berzh a reas ar skolaj-se e-pad daou gantved bennak hag eñ o reiñ bod da gatoliked penañ ar Rouantelezh Unahet (enni, da skouer, e voe stummet Donall O Conaighle, a voe 'dieuber' ar Gatoliked en Iwerzhon - hag e Breizh-Veur - e deroù an 19vet kantved). Bezet pe vezet, e Douai an hini eo e kelennet an danvez beleion a zlee bezañ kaset da Vreizh-Veur (da Vro-Saoz, dreist-holl avat, na petra!) ur wech ma vije bet diskaret ar rouanez Elsbed. Kant studier a dremenas dre ar skolaj-se etre 1570 ha 1600 hogen ne voe ket ken uhel-se niver Kembreiz en o mesk ; un nebeut diouto a anavezet, koulskoude : John Bennett, Robert Gwyn, Owen Lloyd, Lewis Barlow h.a. Morgan Philipps, a-hend-all, en doa roet e zilez e 1577, hag aet e oa da chom e Reims e-lec'h e vevas c'hoazh e-pad pemzek vloaz. Adal 1574 avat e krogjod da gas kimingidi da Vro-Saoz ; pevar er bloavezh-se ; seizh e 1575 ; triwec'h e 1576 ; pemp ha tregont arall etre 1576 ha 1603. Hiniennoù eus ar re-se a yeas da Gembre, evel Williams Davies bet o vevañ e Reims ivez ; hemañ avat a zistroas da Gembre e 1585, a reas e annez e Mon, e rannvro c'henidik ; harzet e voe ha krouget e Miwmares e 1593.

+++++

Skolaj Roma

En ur skolaj all e Roma e voe stummet danvez beleion all evit Kembre. Staliet e oa bet ar skolaj-mañ en un ospital kozh a oa miret da sujidi ar roue saoz bet klañvet e Roma ; eno e

kavas repu reoù zo eus Kembreiz harluet.

Renet e voe ar skolaj da gentañ gant Morrrys Clynnog. Bez' e oa eno un daou-ugent studier bennak, tri saoz ha tregont ha seizh kembread mesk-ha mesk. Bec'h a savas hep dale avat etre rener ar skolaj, ur C'hembread anezhañ, hag ar Saoz on a gave dezho e oa troet gant e genvroiz betek re. Setu, a-benn ar fin, e voe dizornet Morrrys Clynnog eus e garg hag adal 1579 e voe melestret ar skolaj gant ar Jezuisted ; bez' e tlee Morrrys Clynnog mont da chom e Rouen e Bro-C'hall, goude-se e Spagn. Mervel a reas en ur beñseadenn hep bezañ gallet ober netra a-bouez nemet sevel hag embann en harlu ul levr kembraek e 1568 : "Athravaeth Cristionogawl" ("Kelennadurezh kristen"), ul levr elfennel a-walc'h avat, diouzh implij ar werin, peogwir ne gaved ennañ nemet ar pedennoù katolik pennañ.

Ur spered politikel en devoa Morrrys Clynnog, evelkent, nemet, eveljust, e kave dezhañ e oa stag dazont ar Feiz katolik en e vro ouzh emdroadur ar politikerezh en Enez Preden. Setu dres an dalc'h ivez : darvoudoù politikel Bro-Saoz o doa devoudet an disivoud e Kembre, nemet e-lec'h goulenn an dishualded evit e vro - pezh a oa reizhpoell nemet a hañvale d'ar C'hembread-mañ dic'hallus, emichañs - e c'hoanage Morrrys Clynnog adsav ar relijion gatolik e Kembre diouzh addiazeidigezh ur roueelezh katolik e Lunden. Hemañ a zo ster al lizher bet kaset gantañ e 1561 d'ar C'hardinal Morroni. E gwirionez avat ne reas ket lez Roma kalz tra evit harpañ Breizhveuriz katolik ; re bell e oa Enez Preden ha re a gudennoù en doa ar Sez Santel da ziskoulmañ er grist-enezh penn-da-benn .

Skolajoù arall a seurt gant an div hon eus meneget a voe klasket sevel evit stummañ danvez kimingaded e-barzh broioù katolik arall,

e Spagn, peurgent, e Sevilla hag e Vallalolid, nemet ne ouzer ket pet Kembread a oa eno.

Meur a gembread katolik all a echuas e vuhez war an douar-bras, evel Morrrys Clynnog, hep bezañ gallet ober nemeur a dra. Unan anezho e voe Owen Lewis a genlabouras d'ur mare gant Morrrys Clynnog ; e Roma ivez e chomas hemañ en deroù nemet ez echuas e vuhez e Milano, e 1595.

E Milano ivez e vevas Gruffudd Roberts, aozer ur yezhadur kembraek bet embannet e kembraeg er gêr-se hogen ne weler ket mat peseurt levezon a c'helle kaout e unan penn un den o chom keit all diouzh e vro, nemet stadañ diskar ar gravez e Kembre, evel ma rae e 1585, pa skrive e kembraeg : "Klevout a ran ez eus meur a lec'h e Kembre, ya, kontelezhioù en o fezh hep kristen ebet enno, o vevañ evel anevaled. Emañ an noblañsoù hag ar re binvidikañ o vevañ hep soñjal e feiz ebet hag o reiñ skouer d'ar beorion ordinal da vezañ hep feiz na koustiañs..."

Petra a c'helle ober ar gatoliked a-hend-all ? Skignañ un nebeut levrioù evel an "Drych cristionogawl" moulet e Kembre en ur vougev, a-hervez, e-tal Llandudno hag e Rouen e Bro-C'hall hogen a chome ivez elfennel a-walc'h ha lakaet dezhañ bezañ implijet gant ar werin hepken. A-benn ar fin enta e skrive un test all diwar-benn sav-iad ar relijion e Kembre : "N'eus tamm relijion ebet gant ar re a zo dindan tregont vloaz..."

+++++
An Iliz protestant kefridiel o vont war-raok

Graet he deus he mad an Iliz protestant kefridiel e Kembre eus diskarzhidigezh an Iliz katolik gant ar galloud stadel evit mont war-raok. Moarvat, pennadurezhioù an Iliz-se hag ar gouarnamant ne oant ket laouen bras gant diskar

ar gravez dre vras. N'eus nemet lenn er c'heñver-se un testeni all, hini an eskob protestant Whitgift e 1577 (gwir eo ivez, pezh a dregase hemañ e oa obererezh ar gimingaded katolik a veze o li-dañ oferennoù kuzh en tiez prevez). Gouzout a reer a-hend-all e oa bet amsavet an holl eskibion gatolik e Kembre - nemet e Llandaf, se hon eus merket, e-lec'h e oa troet an eskob kent a-du gant ar relijion nevez, - gant eskibion protestant leal ouzh ar galloud saoz, Saozon anezho, ouzhpenn-se. Kounomp ivez adarre e oa bet embannet e 1571 al lezenn a "uhelvrud" a-enep d'ar re ha na anzavent ket Elsbed evel gwir rouanez (1) petra bennak ma ne voe ket lakaet al lezenn-se da dalvezout a-raok 1581. Un torfed e voe diwar neuze treiñ ur sujad eus Elsbed d'ar Feiz katolik ; ur felladenn c'hrevus e voe kanañ pe selaou an oferenn : kement-se a dalveze ur bloavezh toull-bac'h ha telloù-kastiz pounner. Chom hep mont d'an ofiz kefridiel nemetken a dalveze ugent lur sterling tellkastiz adarre. Dre se, evel ma welimp, dister tre niver ar re a grede digemplegañ.

Hogen, eveljust, ne voe ket en abeg d'al lezennoù-se e reas berzh an disivoud e Kembre. Forzh penaos e oa koazhet niver ar Gatoliked a-gent dre ma ne oa ket mui kelennet ar Feiz na stummet an danvez kristenion. War-raok ez eas ar gravez protestant enta dre ma savas ur gronnad pouezus a gefredourion a-du ganti e Kembre. Ar remañ a reas o soñj ober eus ar c'hembraeg ur benveg kefredel da skignañ ar relijion nevez. A-barzh ma vije bet, zoken, troet hag embannet ar Bibl e kembraeg avat e oa bet embannet un toullad levrioù awenet gant ur spered mui-ouzh-mui protestant, hini William Salisbury : "Oll synnwyr penn" e 1546, da skouer. An hevelep kefredour protestant kembreat

(1) Da geñver irienn Babington hag arnod c'hwitet an Armada da aloubiñ Bro-Saoz.

a voulas e 1550 "Kynniver lith a bann o'r ysgrythyr lân" ("Kement kentel ha prezeg eus ar skritur sakr") a oa anezhañ un dastumad pennadoù eus ar Skritur Sakr troet e kembraeg. Adal 1552 e oa bet graet galv end-eeun d'an eskibion da dreiñ ar Bibl e kembraeg. E 1560 e tivizas an eskob Thomas Davies eus Llanelwy lenn an Aviel ha Lizabeth an Ebestel e kembraeg. E 1563 e voe embannet ul lezenn o c'hour-c'hemenn da bevar eskob Kembre hag eskob Henffordd treiñ ar Bibl hag al levr-pediñ e kembraeg, da vezañ implijet en holl ilizoù e Kembre adal ar c'hentañ a viz Meurzh 1566. El lezenn-se ez anzaved e oa "muioc'h a deñvalijenn war dachenn ar Feiz eget en amzer ar Babouriezh." Ar galloud saoz an hini eo enta en deus divizet ober gant ar c'hembraeg evit unvaniñ speredoù sujidi ar Stad saoz ha diazezañ ar protestantiezh evel kealiadurezh a-berzh-stad. Moarvat e oa implij ar c'hembraeg e dislavar gant al lezenn-unaniñ eus 1536 a gemere da bal unyezhañ ar rouantelezh. Mallusoc'h e oa avat evit ar galloud saoz unvaniñ ar relijion a oa kealiadurezh stadel en amzer-se en holl rizezoù europat ; hag a-hend-all, hep skolioù, ne oa tu ebet da gelenn saozneg da Gembreiz. Setu ez asantjod enta d'an treuzvarc'had ma oa treiñ ar Bibl e kembraeg.

An Dr. Salisbury a voe karget d'ober al labour. Bez' e oa eus hemañ egwirionez un den eus an azginivelezh, 'kelc'houiziezh' e anaoudegezhioù, kembraegour, barrek avat war al latin, ar gresianeg, an hebraeg, ar galleg, ar saozneg, an alamaneg, studiet gantañ steredoniezh, prederouriezh ha feizdouebniezh ; seurt 'skolourion' n'hon eus ket bet e Breizh er XVIvet kantved, ha dreist-holl brezhonegourion anezho.

En e labour troour e voe skoazellet gant Thomas Huet a bledas gant an "Diskuliadur" hag an Dr. Richard Davies (nemet e paouezas o c'henlabour hag o mignoniezh d'ur mare dre ma ne dizhent ket en em glevout diwar-benn troidigezh troiennoù zo).

Bez et pe vezet, dont a reas skrid kembraek al levr-pediñ hag an Testamant Nevez er-maez e 1567.

Kendalc'het e voe labour William Salisbury gant William Morgan a oa 22 vloaz e 1567. Hemañ a oa bet oc'h ober e studi e Caergrawnt e Bro-Saoz ; heuliet en doa kentelioù hebraeg ar yuzev Immanuel Tremellius. Pa glevas e oa broc'h-et an daou vignon o doa kenoberiet da dreiñ ar Bibl e krogas gant e labour. 'Beleg' e voe e Llanbadarn Fawr e 1572, e Trawllwng, person e Llanfeyllin ha kure e Llanrhaeadr. Eñ an hini eo a echuas troidigezh ar Bibl penn-da-benn a voe embannet dindan an titl "Y Beibl cyssegrlan", e 1588.

Pouezus tre e voe, eveljust, an embannadur-se evit dazont an disivoud e Kembre. Tra ma oa enket ar Gatoliked d'ur c'hilstourm kreizennet dreist-holl war al liderezh, ul liderezh ha oa ket mui intentet mat gant ar bobl dre ma tremene an amzer ken e troe a-benn ar fin d'un doare folklor - se a welimp pelloc'h - e c'helle ar Brotestanted e Kembre, er c'hontrol, en em vataat eus skridoù diazezh ar Feiz kristen a oa da vezañ implijet en ilizoù evit an ofisoù kefridiel. Moarvat ne voe ket tennet implij diouzhtu eus ar binvioù-se rak izel e oa saviad ar relijion dre vras e Kembre hogen diazezh un adsav kravezel protestant e voent a-benn ur pennad. Ar re eus Kembreiz a a felle dezho kaout un anaoudegezh bennak eus ar Feiz a ranke tremen enta dre an Iliz kefridiel.

+++++

Dizeriadur ar gatoligiezh poblek

E devoud e oa heñvel a-walc'h saviad ar gatoligiezh e Kembre ouzh hini ur stuzegezh plouezat mac'homet gant ur sevenadur kêrel stadel. En em ziskouez a rae enta e kustumoù a golle gwazh-ouzh-gwazh o ster orin. A-walc'h e oa seurt kust-

umoù evit broudañ brouez ha kounnar zoken dalc'h-idi an disivoud ; ar re-se a zeve an arrebeuri sakr, a c'hoapae al liderezh katolik h.a. Alese e teu ar stourm a-enep d'an arouezlunioù ha d'ar gizioù katolik. Alies ez eus anv e danevelloù ar grez-se e Kembre eus kloer brotestant o tistrujañ relegoù ar sent, o tsikar an aoterioù, o lidañ an euc'haristia a-ratozh war un daol goloet gant ul lien hepken ken eoa heuget ar fideled ; daoust da se kendalc'hed da zouarañ ar re varv e lec'h pe lec'h hervez al liderezh katolik, hep beleg zoken a-wechoù, - pe da birc'hirinañ en nevedoù ma oant boaz d'ober a-ziagent, da skouer e Treffynon, feunteun vrudet Santez Wenfrewi, santez vroadel Kembre e-lec'h e teredas Kembreiz betek dibenn palevarz kentañ ar XVIvet kantved. Seurt gizioù avata hañv-ale da bennadurezhioù an Iliz protestant kefridiel bezañ brizh kravezel hepken, seul vui ma oant mesket gant kustumoù kollet o ster katolik ganto ha deuet da vezañ pagan en-dro.

+++++

O klask urzhiañ ar stourm evit adsevel ar gatoligiezh

Hogen, n'eus forzh penaos, ne oa ket a veleion evit plediñ gant ar gatoliked poblekse. Eus skolaj Douai n'oa bet kaset da Vreizh-Veur etre 1576 ha 1603 nemet 35 kimingad bennak (18 o tont a-hend-all eus Vallalolid) ; setu ar sifroù dre ar munud : bez' ez erruas enta 5 kimingad e 1574, 7 e 1575, 18 e 1576 (Rober Llyn en o zouez) hogen an darn-vuiañ eus ar re-se a yae da Vro-Saoz, n'eus forzh penaos ; nebeut anezho a yae da Gembre hag an darn-vrasañ anezho e Reter ar vro, tostoc'h da Vro-Saoz. Anavezout a reer tri diouto e Wreccsam, er biz end-eeun ; hogen ne c'hellent ket ober kalz tra rak dav e oa dezho en em guzhat ; a-walc'h e oa dezho enta lidañ oferennoù prevez, advadeziñ ar vugale, lidañ obidoù katolik,

dalc'hmat dre guzh avat. Moarvat e klasked ivez skignañ levrioù katolik evel "Y drych cristionogawl" bet meneget ganeomp a oa bet moulet dre laer, e-giz m'hon eus merket ivez, en ur vougev war ribl ar mor gant William Davies (1) eus Groes, a voe repuet e Penrhyn ('Penrun') etre 1585 ha 1587. Hogen lavaromp adarre e oa seurt lizheradur re elfennel evit kevezañ ouzh troidigezh protestant klasel ar Bibl, da skouer (2).

Piv a yae d'ober ar Gatoliked ?

O terc'hel kont eus kement-se holl ne vo souezhet nikun o wiriañ e oa dister tre niver an digemplegerion gatolik er XVIvet kantved. Diwar 212 450 'pleustrer' niveradeget e 1603 ne oa nemet 808 dinac'her : 0,1% en eskopti Bangor, unan diwar daou-c'hant en eskopti Llandelwy, 1% en eskopti Llandaf, unan diwar c'hwec'h-kant en eskopti Tyddewi. Nebeut tre eo moarvat hogen dav eo derc'hel kont eus al lezennoù gwaskañ hon eus meneget. A-benn ar fin ne c'helle derc'hel penn ouzh an heskinerezh nemet un nebeut 'bonezourion' ('noblañsoù') un nebeut 'rezdalc'hidi' ('kouerion dieub') a c'helle talañ an telloù-kastiz (lod avat a veze lakaet gwerzh war o douaroù hag o madoù) pe neuze, peorion ha gwraez kozh ha n'o devoa netra da goll.

Eveljust e oa seul greñvoc'h ar gatoligiezh en ur c'horn ma oa muioc'h a levezon gant un'tilu bonezik' ('tiegezh noblañs') bennak. Da skouer, e korn-bro Llyn e oa pevar 'c'hastellour' e darempred gant ur c'hatolig, Hugh Owen, lezanvet an 'treitour', mab da Owen ap Gruffydd eus ar 'Plas

(1) E kreisteiz Kembre o deveze ar Gatoliked darempredoù gant beleion divroet war ar c'hevandir, niz Morrys Clynnog, da skouer.

(2) E 1585 e oa bet gourc'hemennet d'ar veleion gatolik kuitaat ar vro. William Davies a chomas. Harzet, barnet d'ar marv ha dieneet e voe e 1593, e Miwmares.

Du" ('Kastell Du') ha Margaret, merc'h Ffow Salisbury, eus Llanrwst, bet harper ar c'hont Arundel, a-du gant gant Mary, rouanez Alba. Meur a ezel eus an tiegezhioù-se a ranke didec'hout d'ar c'hevandir ; Hugh Owen a oa marv e Roma e 1618 ; e vreur Robert a oa bet harluet ivez hag a oa deuet da vezañ chaloni en Iliz-Veur Le Mans e Bro-C'hall ; darempred en doa hemañ avat gant Thomas a chome er gêr (lizhiri dirgel a veze kaset da hemañ, kuzh e-barzh solennoù boteier pe vizhier h.a.) Er "Plas Du" ivez e kave repu c'hwec'h a veleion gatolik a visione en taolead ; kambroù kuzh a oa miret dezho er c'hastell. Un ezel all eus un 'tilu bonezik' all en hevelep korn-bro en devoe ur roll bennak en arnod adsevel ar gatoligiezh e Kembre : Robert Gwyn, eus tiegezh Bodfel ; hemañ a droas an oberenn 'The christian directory or book of resolution'e kembraeg.

Tiegezhioù kembreat katolik all a c'heller menegiñ : Montague, Puw, a gendalc'has da zifenn ar feiz katolik e-doug ar seitekvet kantved, an Twrbilied, Morgan, Bodfari en hanternoz he peurgent eus Llandudwg. E Morganwg, er c'hreisteiz, e reer anv eus eizh tilu katolik e oa bet lamet o douaroù diganto en abeg d'o feiz. Dre vras avat e oa distank an tiegezhioù-se ha diaes bras e oa dezho ren ur vuhez relijiel hervez o feiz ; a-wechoù e rapke darn eus o izili mont betek Lundenda ober o Fask a-benn chom hep bezañ rediet d'henn ober en iliz parrez. C'hoarvezout a rae ganto kemplegañ a-wechoù pe dalc'hmat zoken a-benn ar fin, evit kaout ar peoc'h. Ret eo ouzhpennañ e chome ar feiz protestant kefridiel neuze tost a-walc'h dre lod eus he lidoù d'ar feiz katolik ; d'an dud dizek e oa diaes ober an diforc'h ; ar re all a c'helle ober o mad eus amsteriegezh ar saviad evit sioulaat o c'houstiañs. An dra-se hon eus damvenet dija, a-hend-all. Evel henn ivez ez eo deskrevet stad ar relijion e dibenn ar XVIvet kantved gant un istorour :

"Taolennañ Kembre evel katolik pe bro-
testant e bloavezhioù diwezhañ ren Elsbed kentañ
a vefe ken fazius all. Tra ma kemplege an darn-
vrasañ, da vihanañ ur wech an amzer, kalz, marte-
ze ar pep brasañ, a rae evel-se en ur virout un
tamm bennak ur soñj kuzh en o fenn, hag int o
c'hoanagiñ e teufe kemm en traoù a-benn an diwezh."

+++++

Ar Gatoliked e Kembre dindan ren
Jakez ar C'hentañ

D'ar 24 a viz Meurzh 1603 e oa marv
ar rouanez. Ret eo merkañ, da gentañ, e sigur se,
e kave gwell katoliked Vreizh-Veur Jakez ar C'hent-
tañ, eus Skoz, daoust ma oa protestant, eget ur
spagnad, pezh a ziskouez e oa trec'h en o spered
evelkent al lealegezh ouzh ar Riez Saoz d'an hini
a roent d'ar Gatoligiezh ha d'ar Pab (hogen ne
weler ket mat kennebeut peseurt lealaegezh a rankje
ur C'hatolig breizhweurat a neuze bezañ miret
e-keñver ar Pab).

Er penn-kentañ ne hañvale ket ar roue
nevez bezañ tuet fall d'ar gatoliged ; ar re-mañ
o doa graet ur c'houlennadeg evit tapout an aotre,
da vihanañ, da bleustriñ o relijion er gêr.

E-barzh ur 'c'hkewez' savet e kembr-
aeg gant Gwilym Puw, eus an tiegezh hon eus men-
eget a-raok, e kaver anv eus goanagoù katoliked
Vreizh-Veur d'ar mare-se.

Ma oa troet mat Jakez ar c'hentañ en
deroù gant ar Gatoliked ne voe mui heñvel ar gont
war-lerc'h un irienn lu a-walc'h a denne da skra-
pañ ar roue ha d'e zerc'hel prizoniad, diwallet
diouzh gwall levezon an 'arluz' Cecil enebet ouzh
ar gatoliked. Harzet, barnet ha dezvlazhet e voe
ar beleg Watson. E irienn, avat a voe harpet e kreis-
teiz hag e reter Kembre (Caerfyrddin, Penfro h.a.).
Padal ne gredjod ken dastum telloù diwar-goust
ar re a anzave bezañ katoliked a-c'houdevezh.

Grevusoc'h e voe heuliadoù "irienn ar
varrikennad poultr" he doa da bal lakaat da dar-
zhañ 'Ti ar C'humun' e Lunden. Berzet e voe neuze
pep karg kefridiel ouzh ar gatoliked ha ne voe
lamet al lezenn-se nemet e 1829 war-lerc'h stourm-
adenn O Conaighle.

Daoust da se e talc'has ar gatoligiezh
he zachenn en hanternoz hag e biz Kembre dreist-
holl daoust ma kendalc'hed da heskinañ bepred an
hevelep tiegezhioù. E Dinbych, er biz enta, da
skouer, e oa c'hoazh e 1624 kant-nav-ha-tregont
dinac'her. Padal e veze didaeret an handerezh
a-wechoù gant damantiz an archerion a gemenne en
a-raok d'an danvez tamallidi e oad o vont d'ober
furchadeg en o zi. E keñverioù zo, moarvat, ez eo
ret anzav e wiske an 'harzerezh'-se mui-ouzh-
mui stumm ur c'hilstourm dizremmwel ha dispi, a-
berzh gwraeg dreist-holl, da skouer; rak ar mer-
c'hed a chome stag muioc'h ouzh ar relijion gat-
olik a oa tostoc'h d'o c'halon, moarvat ; c'hoarv-
ezout a rae er c'hontrol ez ae ar wazed d'an iliz
kefridiel evit gellout derc'hel d'o amezhioù din-
dan ar gouarnamant, lakaomp. Daoust da gement-se
e oa uhel sammad an taosoù enkefiet diwar goust
ar gatoliked e kontelezh Fflint e biz Kembre e
1624 dalc'hmat : 18 360 Lur Saoz ; koustañ a rae
ugent lur bep miz chom hep bezañ bet war-dro an
iliz kefridiel.

+++++
Obererezh ar gatoliked e Kembre
er seitekvet kantved o kregiñ

Evit bezañ reizh e ranker merkañ
penaos e vire ar gatoligiezh un tamm nerzh evel-
ato da vont war-raok e keñverioù da vihanañ.
Hiniennoù a veze kanttroet d'ar Feiz katolik.
Unan anezho Hugh Owen - n'eo ket an hevelep hini
hag unan a zo bet kont anezhañ uheloc'h - marv
e 1642 e gevred Mynwy, da skouer, a oa bet desavet

er feiz protestant (kerentiet e oa zoken, dre e wreg, da gargidi eus an iliz kefridiel) ; kabit-en milisia e oa zoken hogen adal 1621 e oa deuet da vezañ katolik gredus ken e lakaas sevel e vab er feiz katolik war an douar-bras. A-benn ar fin en doa gwerzhet e vadoù (1) evit mont da vevañ e ser tiegezh kont Caerwrangon a voe unan eus katoliked nerzhusañ e amzer. Sammañ a reas warnañ treiñ "De imitatione Christi" e kembraeg. E vab, an Tad John Hugh, a zo bet aozer ul levr katolik all "Allwydd neu agoriad Paradwys i'r Cymry" a voe moulet e Liège, en Izelvroioù gallek e 1670. Krediñ a ranker enta e oa oberiant mat katoliked Enez Von hag an hanternoz e Kembre - da Enez Von e oa aet d'en em staliañ Hugh Owen - hag e oant douget d'en em strollañ evit herzel suroc'h ouzh al lanv protestant o beuze.

Gant katoliked ar c'hreisteiz e oa ivez hevelep kreizennoù, e kontelezh Caerfyrddin. Deredek a rae di katoliked eus gevred ar vro hag eus kreiz Bro-Saoz, zoken, - en o zouez Robert Acton - evit en em strollañ e kumuniezhoù bihan (ozhac'h, gwreg, bugale, koskor) ; nac'hañ a raent touiñ le ebet a lealegezh ouzh ar roue. E keñverioù zo enta en em ziorree e-tal ur gatoligiezh poblek henvoazel dilusk ur gatoligiezh dialuskel betek ur poent zo ha kement ha ma oa lezet gant un heskinerezh strizh ha padus, herouezet gant kimingaded - Jezuisted anezho a-wechoù - kaset eus ar c'hevandir. Aet e vefe ar gatoligiezh kentoc'h war-raok en amzer Jakez ar C'hentañ, marteze dre maz eo bet distennet un tamm bennak an handeerezh dindan e ren : e 1622 en doa gourc'hemennet ar roue e ve divac'het 4500 karc'hariad, beleion ha liked (e gwirionez ar Sened Saoz an hini eo a oa ar muiañ arloupet da boursuiñ ar gatoliked evel ma reas en e zalc'hoù-labour e 1604, 1606, 1610).

Kredapl a-walc'h eo, evel ma venegemp

(1) Daou verour all eus ar c'horn-bro o doa graet kement-all war an hevelep arbenn.

uheloc'h, ez eo dleet an tamm kresk-se er Feiz katolik e Kembre frouezh ur c'himingaderezh o tont eus an douar-bras. Diaes eo avat diverzout dilec'hiadennoù ar gimingaded-se. E 1608 e kaver roud e danévellskridoù ar mererezh eus ar striv da dapout krog e daou anezho. Kont a zo bet a-raok ivez eus kembroù kuzh miret d'ar visionerion er "Plas Du" ; e kastell Rhaglan ivez e oa aozet seurt kembroù kuzh evit ar veleion. Unan eus izili an tilu-se a-hend-all, an Tad John Salesbury, a veve er c'hastell etre 1615 ha 1625 ; bez' e oa anezhañ pennrener ar Jezuisted e Kembre (bez' edo pennkadlez ar Jezuisted a-ziaraok e parrez Llanrhyddol, war harzoù Mynwy) ; an tad-se ivez an hini eo en devoa savet hag embannet e kembraeg bepred 'Eglurhad helaethlawn o'r athrawiaeth crist-nogawl' ('Diskleriadur klok eus ar gelennadurezh kristen'), er bloavezh 1618.

++++
Ar gatoliked dindan ren Charlez
ar C'hentañ

Nebeut a gemm a c'hoarvezas e saviad ar gatoliked e-pad ar ren-se. Pezh a voe heverk avat e Kembre evel e Bro-Saoz e voe diwanadur un emdenniezh protestant kentañ, enebet ouzh an Iliz kefridiel hogen enebet muioc'h c'hoazh ouzh Iliz Roma.

Lavarout ne oa ket kalz kemm e saviad ar gatoliked a dalvez, da gentañ, ne oa ket deuet gwellaenn en o stad. Sellet e oa e gwirionez ouzh ar gatoliked evel ouzh ur "pempvet bann" e diabarzh ar riez saoz. Difennet e voe ouzh ar gatoliked, da skouer, derc'hel armoù e 1625-1626 ; graet e voe furchadegoù en o ziez e kontelezh Caernarfon ; Bev buhezek e chome c'hoazh henvoazioù zo e-mesk ar bobl. Daoust d'ar berz lakaet meur a wech war ar pirc'hirinaj en em vode c'hoazh etre 1400 ha 1600 a fideled en-dro da feunteun Santez

Wenfrewi, ken beleion, ken liked, en o zouëz daou arluz, William Howard hag arluz Amwythig. Hogen e 1636 e voe embannet ur wech ouzhpenn ul lezenn o lakaat fin da vat d'ar pirc'hirinajoù-se. Dastum a raed dalc'hmat taosoù diwar goust an digemplegerion ; ha darn, diwar heul bepred, a veze dibeerc'hennet eus o douaroù daoust ma veze aotreet dezho o feurmiñ en-dro.

E 1629 e oa degouezhet an troc'h etre ar roue hag ar sened hag a voe deroù ar brèzel diabarzh (er bloaz-se end-eeun e oa bet kaset di-rak al lez-varn 48 digempleger katolike e Kembre, pezh na oa ket kalz e-keñver bloavezhioù arall).

Padal, adal miz Gouere 1637, da heul ar "Sened Hir" dalc'het e Lunden e washaas an traoù evit katoliked Kembre. E 1641 e oa kroget an emsavadeg en Iwerzhon. Tost d'ar vro-se avat e oa Enez Von en hanternoz ha rannvro Penfro er c'hreisteiz ha prest e oa ar pennadurezhioù saoz da grediñ e oa katoliked Kembre o klask dastum ul lu katolik faltaziek en-dro da gKastell Rhaglan hag a oa da vezañ renet gant kont Caerwrangon, ur wech kevr-edet gant lu ar Ouezeled ; war ar marc'had edo e Rhaglan armdi ar gontelezh. Hiboudal a raed e oa al lu-se o vont da dagañ Conwy, ur gêr greñv eus arvor Kembre en hanternoz. D'ar c'houlz-se, e 1640, e oa uhel a-walc'h dregantad ar gatoliked en ezez Von : diwar 154 den enskrivet war ar "subsidy roll" en ur vourc'h e oa pemzek anezho o tinac'hañ mont d'ar servij relijiel kefridiel ('recusants') ; ar re-se a bae div wech muioc'h a dailhoù eget ar re all. Aes eo kompren goude-se e veze e veze rivinet ha kaset da get a-benn ar fin tiegezhioù zo. En un danevellskrid eus 1650 e reer anv eus 91 katolik kembreat a gollas evel-se an div drederenn eus o zachennoù etre 1645 ha 1650 (eus Mynwy an darn-vuiañ anezho, elese, 53) ; en hanternoz e oa douaroù 22 katolig aet da breizh da gefriadiad ar Sened (Cromwell a oa damantus evit ar

rannilizoù protestant emdennat hogen tamm ebet evit ar gatoliked ; kv. e annougadenn e 1655 a-enep d'ar veleion ha d'ar Jezuisted).

Dre ur seurt heskinerezh pennek ha dalc'hus e tistrujed tamm ha tamm an digemplegerion gatolik diwezhañ.

+++++

An taol diwezhañ war-lerc'h an
addiazeidigezh e 1660

E 1670 e oa gwashoc'h eget biskoazh stad ar Gatoliked e Kembre hag int mac'het gant pevarzek lezenn-gastizañ diforc'h o pouezañ warno. Un tamm goanag a savas dezho pabignas ar roue nevez war an tron e Lunden ; bez' e oa da hemañ ur mab ezpriedel a oa beleg gant ar Jezuisted. Hogen Ti ar C'humun a oa bepred ken arloupet a-enep d'ar gatoliked. Ur brouenn eus kement-se hon eus el lezenn a voe kaougantet eno gant ar gannaded hag a denne da strishaat gwashoc'h c'hoazh al lezennoù bet embannet a-ziaraok hag a oa o fal forc'hañ ar gatoliked diouzh pep karg dindan ar gouarnamant, el lu hag er verdeadurezh.

Saviad ar gatoligiezh e Kembre e 1673

Arc'heskob Caergaint e Bro-Saoz en devoa graet e soñj ober ar gont eus an holl gatoliked (hag emdennidi) er rouantelezh, a-benn diskouez, moarvat, n'oa ket uhel tre o niver.

E 1676 enta setu penaos edo an traoù gant ar Feiz katolik e-barzh tri diwar ar pevar eskopti kembreat. En tri eskopti-se e nivered 1085 katolik, an hanter anezho o tennañ o orin eus Mynwy, elese, 541 ha da gement-se, na petra, e ranker lakaat kiriek levezon Kastell Rhaglan, hag un nebeut tiluoù evel hini Somerset (dezhañ ur mab manac'h e Cambrai hag ur verc'h leanez en Antwerpen, en Izelvrioù a neuze), ivez hini Morgan. E deandi ar Fenni e konted 400 katolig zoken, pezh

a ziskouez e oa bodet an holl gatoliked en hevelep korn-bro, evel un enezennad a-ziforc'h e-kreiz al lanv protestant. Padal e oa 34 beleg o kimingadiñ er gontelezh-se, o vont a di da di da lavarout an oferenn ha da lidañ an euredoù.

E kontelezh vMynwy bepred e oa bet savet dre guzh un doare skolaj dirgel, gouestlet da Sant Frañsez Xavier er bloaz 1653 hogen deuet e oa da vezañ un doare kumuniezh Jezuisted. E 1678 en em gave eno pemp pe c'hwec'h lean, tri anezho o c'houzout mat ar c'hembraeg hag o prezeg ennañ ingal. Ar re-mañ avat a akede evit maz aje bugale ar Gatoliked da ober o studioù war an douar-bras, en Izelvroioù pe e Roma zoken.

E kontelezh vBrycheiniog e nivered 164 katolig e 1676 (titour ebet kent ar mare-se). A-hervez ivez e oa 27 Jezuist o visionañ er c'hreisteiz.

Un nebeut kimingaded a seurt se a oa ivez en hanternoz ; eno avat e oa digresket niver ar gatoliked nemet e kornioù zo evel Llanddety war-dro 1652. Padal er rannbarzh-se e oa ivez un doare annezva Santez Wenfrewi diazezet gant ar Jezuisted ha pemp lean a oa o vevañ eno e 1673. Nepell alese edo Feunteun Santez Wenfrewi, bet meneget ganeomp meur a wech, ha kont a zo e danevelloù eus an amzer-se eus burzhudoù c'hoarvezet eno : e 1674 e oa bet pareet un den yaouank peluzet h.a.

Dre vras, koulskoude, evel ma verkemp bremañk, ez eo aet niver ar gatoliked war zigreskiñ en hanternoz Kembre e dibenn ar XVIIvet kantved. Da gement-see voe kiriek, evit darn, moarvat distrujidigezh annezva ar Jezuisted er c'hcwm emamp o vont da ziskleriañ pelloc'h ; hogen ouzhpenn-se, evel m'hon eus diskleriet meur a wech, ez eo bet rivinet ha kaset da get tamm ha tamm gant an heskinerezh an nebeut tiegezhioù a roe harp d'ar Feiz katolik er rannvro-se. Kounomp evelato e vane

1.122 katolig diskleriet e Kembre e 1676 (etre 14.000 ha 15.000 pleustrer katolik a oa o vevañ e Kembre koulz hag e Saoz er bloaz-se).

+++++

An heskinadenn diwezhañ

D'ar mare-se eo e voe skoet an taol gwashañ a-enep d'ar gatoligiezh e Kembre hag e Saoz.

Un Titus Oates bennak a roas da gredañ d'ar Sened edo ar Jezuisted o vont da zrouklazhañ ar roue evit lakaat e vreur Jakez en e lec'h hag adsevel ar relijion gatolike Breizh-Veur. Ar Sened Saoz ne c'houlenne ket gwelloc'h eget lonkañ koñchennoù Titus Oates hag adal 1678 e voe lakaet e talvoud en o strishañal lêzennoù-kastiz a-enep d'ar gatoliked. Harzet e voe e pep lec'h Jezuisted ha beleion ha dieneet e voent gant ar c'hrizder boaz en amzer-hont. Katoliged vMynwy avat a voe tizhet ar gwashañ. Furchet e voe er c'hcwm gant an Doktor Herbert Croft, eskob Henffordd, a voe ur c'hatolig d'ur mare. Lakaet e voe an arigrap war ar skolaj a c'hoarveze eus daou savadur a c'hwec'h sal, 21 siminal enno, gant trepasoù kuzh h.a. Dizoloet e voe lidwiskoù, ezafñs (ur brouenn diarvar!), lizheradur bruderezh katolik.

Diwar ar Jezuisted a voe paket eno e voe dieneet John Arnold ha John Scudermore, John Lloyd, Philip Evans e Caerdydd etre an 11 a viz Gouere hag ar 7 a viz Eost ; David Lewis a voe dezvalazhet e 1677 e Brynguba, John Kemble e Lunden. Hag eñ barnet d'ar marv e varvas an tad William Lloyd e karc'har Aberhonddu.

Displeget hon eus a-hend-all e oa 34 beleg o kimingadiñ e kreisteiz ar vro da vare an heskinadenn ; unnek diouto a voe paket ha, war an harzoù, Robert Pugh eus tilu katolik kozh katolik Penrhyn Creuddyn ; hemañ a varvas e karc'har Lunden kent e brosez ; tri all a voe lazhet o klask tec'hout diouzh o heskinerion.

Dibenn ar seitekvet kantved

E 1679 e voe toullbac'het ivez un ne-beut liked, an darn-vuiañ avat eus Mynwy bepred ; pemzek diouto a chomas daou vloaz e karc'har Brynguba evit bezañ nac'het darbenn al lezenn diwar-benn an "dreistbeliezh", 'bonezourion' evel George Turberville h.a. E Morganwg e voe klevet anv e 1679 ivez eus bac'hañ nav a baotred hag a verc'hed ha kement-all e kontelezh Caerfyrddin ; e-lec'h-all edo ar gatoliked dindan dec'h.

Pa zeuas Jakez an Eil war an tron e Lunden e voe torret un tamm d'an heskinerezh, etre 1685 ha 1689 ; d'ar c'houlz-se zoken e voe kanttroidi e Rhydychen ('Oxford') hag e lez ar roue. E Kembre zoken e oa kargidi zo katoliked bepred : 27 'ustus', diwar 300 kargiad a seurt ganto, gwir eo).

An diskleriadenn diwar-benn damanterezh-kredenn e 1687 hag a zlee kensellout degouezh ar gatoliked koulz hag hini an emdennidi protestant a chomas lizherenn varv e 1688, en abeg d'ar Sened bepred ; er bloaz-se end-eeun e ranke ar re-se paeañ 50 lur a dell-kastiz evit chom hep pleustriñ an iliz kefridiel.

N'eus forzh penaos ez eas buan war zigreskiñ niver ha gred ar gatoliked hengounel e Kembre : e 1701 ne oa mui nemet pevar beleg o kimingadiñ e kreisteiz Kembre e-lec'h an degadoù a oa bet e-kerzh ar seitekvet kantved. Koazhañ a reas ivez dillo niver ar fideled o unan, nemet e kornioù digevannez eus kontelezh vMynwy.

=====

KLOZADUR

Aozer an danvell "Cymru a'r hen ffydd" m'eo diazezet warni evit darn ar studiadenn-mañ a veneg evit echuiñ un arroudenn eus ul levr saoznek

a zo gouestlet ivez da istor Katoliked Kembre en daou gantved-mañ ; skrivagner an oberenn-se a laka kiriek da zrouziwezh ar Feiz katolik er vro-se digalon ha digasted Kembreiz, anezho ur bobl sujet deuet da vezañ dic'houest da dommañ ouzh talvoudoù speredel. Gwelout a raimp pelloc'h petra a zo da da soñjal diwar-benn ur seurt tamall. A-ziaraok avat e karfemp reiñ un diskleriadur klokoc'h eus berzh ar Brotestanted el ledenez-se hag a zo dres da geñveriañ ha da enebiñ ouzh o droukverzh en enez Iwerzhon.

Unan eus abegoù ar berzh-mat-se enta a zo bet enframmadur ar gevredigezh kembreat er reizhiad politikel saoz hon eus klasket diskouez diwar daolennañ ar reizhiad-varn diazezet gant mistri ar Stad saoz en he c'hreiz. Seurt enframmadur avat ne c'hoarvezas en Iwerzhon (pe e Breizh, er Stad c'hall) nemet e dibenn an XVIIIvet kantved pe deroù an XIXvet kantved. Adal ar XVIvet kantved avat ez eo bet prenet hag atoret gant ar Stad saoz ar pep brasañ eus renkad-ren Kembre, uhelidi ha kloer, peurgetket, a zo deuet da vezañ kargidi ar Stad saoz hepmuiken. Moarvat hon eus meneget un toullad noblañsoù a zo chomet feal ouzh ar Feiz katolik ; lakaomp e vije bet 10 pe 20% anezho (ne gomzan ket eus ar werin pe, zoken, ar gouerion dieub ha n'o doa galloud politikel ebet) ; ret mat eo anzav o deus pleget ar re all (evel m'eo kaer gortoz, forzh penaos) d'ar galloud stadel.

Ar pep puezusañ avat e voe avat dinodadur ur gronnad kefredourion gembraek a lakaas o gouiziegezh e servij an adreizh protestant stadel hag int broudet koulskoude - ha setu an iskisañ - gant un doare brogarouriezh kembreat. Gouizieion eus an azginivelezh e oa ar re-se, doazh avat ouzh hengoun lennegel ha sevenadurel ar vroad hag o klask stagañ an hengoun-se ouzh mennadoù an adreizh protestant. Ar re-se eo a droas ar Bibl e kembraeg, ha n'eo ket e n'eus forzh peseurt kembraeg poblek hogen e kembraeg lennek ar grennamzer. Bez' e oa anezho an eskob Richard Davies, an arc'heskob Parker hag e

sekretour Jocelyn, William Salesbury, troour an Testamant Nevez ; ar re-mañ a geje kenetrezo en un doare reoliek en Abergwili (er bloavezh 1566, da skouer) pe a genskrive an eil gant egile ; e darempred e oant ivez gant Humphrey Lhuyd, ur 'skolour' all eus an azginivelezh kembreat a oa o vevañ e Kolun, e bro ar Roen, ha na ouzer ket a-wechoù ha katolik pe brotestant e oa (protestant e oa, a-benn ar fin daoust m'en devoa darempred gant ar Chaloni Gruffydd Roberts a oa staliet e Milano).

Mat. Evit meizañ peseurt mennozioù a oa gant izili ar stroll-studi-mañ en devoe ken bras levezon war dazont ar gravez e Kembre ez eo ret treiñ ouzh ar skridoù embannet ganto evel "Epistol at yr oll Gembru ys ydd yn caru Ffydd ei hen deidiau, y Britanieit gynt" a zo un doare raklavar da droidigezh an Testamant Nevez ; treiñ a c'heller ivez ouzh skrid latin Parker "De antiquitate Britannicae Ecclesiae" (el levr-mañ e kaver mennozioù displeget e-barzh oberennoù all savet gant Polydro Vergil hag Hector Boethius) ; anv a c'heller ober ivez eus "Historiae Brytannicae defensio" diwar bluenn Seur John Prys (ur C'hembread, na petra) hag ivez "Commentarioli Britannicae descriptionis fragmentum" gant Humphrey Lhuyd (1) e Kolun, end-eeun. Menegiñ a ranker ivez 'The historie of Cambria' e saozneg gant David Powell (ur C'hembread evel m'henn diskouez an anv). Adal kreiz ar XVIvet kantved avat en em ziskoueze seurt mennozioù e-barzh ar flemmskrid kembraek 'Bann wedy ei dynnu ac yngair all o hen gyfraith Howel Da' e 1550 kerkoulz hag e-barzh raklavar William Salesbury d'un oberenn brotestant all e kembraeg, bet meneget ganeomp endeo: "Oll synnwyr pen Kembero" e 1547.

Penaos doareañ ha deverra ar mennozioù displeget e-barzh ar skridoù-mañ ?

Mennad an holl skrivagnerion-se a oa prouiñ e oa gant Kembreiz - kemmesket gant 'Predeniz'

(1) E 1572.

ma save o istor betek an henamzer, e-giz ar C'halianed e Breizh - e oa bet degaset ar relijion gristen e 'Preden' adal deroù ar grez kristen, eus ar reter war-eeun, gant Jozeb a Arimatia, pe neuze, e oa bet fiziet ar Feiz kristen-se gant Eleutherius, eskob e Roma, e Roue Preden a neuze. "For that," a ouzhpenn unan eus ar skrivagnerion, "King is vicar of God in his own kingdom..." Ha setu dres ar pep pouezusañ : ret e oa d'ar gristenion degemer 'dreistbeliezh' Roue 'Preden' war aferioù an Iliz en Enezenn.

Eveljust ez eus d'en em c'houlen penaos e c'hell klotañ hevelep lealegezh ouzh ar galoud saoz gant ar vrogarouriezh kembreat. Da vihanañ e kembeze ganti, war se n'eus douetañs ebet rak pezh a glaske ar 'skolourion'-mañ diskouez e oa penaos e oa bet 'breinet' an Iliz vrezhon dishual-se gant ar manac'h 'saoz' Eosten ('Augustinus'), abostol ar Saozon, rediet gantañ ar Vrezhoned da blegañ d'an Iliz Saoz ha, dre se, da Iliz c'haouiat Roma. War un dro ez arnoded ivez anataat penaos el lennegezh kembraek kozh (lezennoù Howel Da, krennlavarioù Taliesin h.a.) e oa Kembreiz a-du gant dimeziñ ar veleion ; ne oa ganto gwechall nemet daou sakramant (ar vadeziant hag ar gomunion) ; e soñje dezho e oa salvet ar gristenion dre ar Feiz ha n'eo ket dre an oberoù pe e oa roll ar 'beleg' prezeg an Aviel hepken ha n'eo ket oferennañ evit ar re vev hag ar re varv h.a. Da lavarout eo, pennañ tezennoù ar Brotestanted. (1)

Merket hon eus uheloc'hik e oa digem-poell a-walc'h savboent ar gefredourion-mañ peogwir en em harpent war un dro war roue Bro-Saoz (gwir eo e oa hemañ a ouenn gembreat, sañset, hag o ren war bPreden!) hag e raent galv ha dave d'un hengoun kembreat broadel, - nemet seurt savboent a glote en un douez ivez gant lazoù an uhelidi gembreat aet da gargidi roue Bro-saoz nemet a chome stag bepred koulskoude ouzh o broadelezh kembreat (unyezh e chome an

(1) Notomp e chomas brudet ar mennozioù-se pell amzer el lennegezh kembraek, betek en XVIIIvet kantved e-barzh oberenn glasel Theophilus Evans "Drych y Prif Oesoedd" ("Melezour an oadvezhioù kentañ") e 1740.

darn-vuiañ eus an uhelidi hagint desket a-hend-all war o lennegezh kozh) ; dre se ivez e oant levezonet gant hevelep lizheradur ha gounezet dre sé d'an adreizh protestant, seul vui ma oant trellet gant ur ouiziegezh - e gwir, mesket gant mojennoù a bep seurt -- hag un helennadurezh e lennegezhioù hag e yezhoù an henamzer hag a oa kalz dreist d'o anaoudegezhioù-int ; end-eeun, dre ma oant desket war an hen yezhoù-se hag ivez e darempred gant metou kefredel Europa protestant d'ar c'houlz-hont en em vatae ar skriva-gnerion-se eus un 'arwarzh' a oa gouest da zelanvadiñ an uhelidi hag ar gloer kembreat enframmet dre gaer pe dre heg er reizhiad politikel saoz. War un dro, ret eo lavarout, hañvalout a raent difenn ur c'hlanvuhez kravezel sklerijennet ha poellek a oa uheloc'h, d'o soñj, eget ur vrizh kevrinouriezh katolik a vane toueziet gant treuzkredennoù ar werin (kv. istor Feunteun Santez Wenfrewi, al liderezh katolik e unan h.a.). Hag erfin, dreist-holl, en em skorent war ar galloud stadel. Setu, daoust ma ne oant nemet ur bihanniver dister tre o deus gellet kemm kravez ar vro.

E-skoaz d'ar re-se, petra a c'helle ober ar gatoliked ? Nebeut a dra. Moarvat e oant heskinet ha rediet d'en em guzhat. Padal e c'hell unan ober goulennoù dezhañ e unan e sigur darvoudoù zo. Da skouer, perak n'o deus ket gellet ar manatioù herzel gwelloc'h ? Peseurt abeg a zo bet d'o drouziwezh ? Unan hon eus roet dija : enframmadur an uhelidi hag ar gloer er reizhiad politikel saoz. Abegoù all a oa ivez, moarvat. Ret eo krediñ ne oa mui ar manatioù azasaet strizh ouzh ar gevredigezh kembreat daoust d'ar roll o devoa c'hoariet er c'hantvedoù tremenet er gevredigezh-se. N'oa mui anezho, moarvat, d'ar mare ma voent divodet, nemet 'kengladoù gounezet' oc'h arc'hwelat evel unvezioù-kenderc'hañ armerzhel, diforc'h diouzh ar gevredigezh plaen, heñvel ouzh enezennadoù pe greñvlec'hioù estren ouzh ar vroad ma vevent en he c'hreiz. Evit ar veleion, ret eo krediñ e oant dizek re alies, evit ar pep

brasañ anezho ; en em c'houlenn a c'heller zoken hag an darn-vuiañ anezho o deus merzet dalc'h an Dispac'h a c'hoarveze dirak o daoulagad er riez ma aparchantent dezhi ; un nebeudig re hepken o deus meizet eus petra e oa anv : gant piv e tlee mont an dreistbeli, gant ar Pab hag an Iliz pe gant ar Roue hag ar Stad. Ar re o deus asantet da zreibeli ar Stad evit chom hep koll ar gravez penn-da-benn - hag a oa tud relijiel a spered - n'o deus ket meizet moarvat e tigorant an nor d'an nerzhioù a zlee distrujañ ar gevredigezh kristen a oa bet o vleuniañ e-pad kantvedoù ha ma choment stag outi, emichañs, daoust da bep tra.

N'eo ket sur kennebeut o deus merzet mat ar gatoliked kendro ar reveulzi a c'hoarveze en amzer-se ; e meur a geñver o deus renet ur c'hilstourm dall hag 'anienel'. A-benn ar fin, petra oa o spi pennañ ha diwezhañ ? Traken nemet adsevel ur roue katolik war dron Lunden. Siwazh, bez' e oa ar Stad saoz kentañ patrom ar Stad europat arnevez e-lec'h emañ al lañs gant ar gevredigezh politikel hec'h unan ha n'eo ket gant galloud karismatek ha sakr ar roue dileuriet gant an Iliz. Er seitekvet kantved eo o deus graet ar Saozon o dispac'h ha kroget da dregemm ar roue en ur fetichenn. Ar Sened saoz eo a zo bet kiriek bepred da heskinadur ar gatoliked e Breizh-Veur ha biskoazh n'en deus gellet ar roue, en desped d'ar youl-vat en devoa e-keñver ar gatoliked, herzel outañ. Daelañ a ray unan he deus ar rouanez Elsbet c'hoariet ur roll pouezus e politikerezh he bro, lakaomp. E gwirionez, evel ar Roue Herri IV e Bro-C'hall d'an hevelep mare, n'he deus renet nemet ar politikerezh a glote gant ar gevredigezh m'edo er penn anezhi. Dre se tleje ar gatoliked bezañ komprenet n'oa ket erlec'hiañ ur roue ouzh ur roue all a oa d'ober (kv. iriennoù diboell ar seitekvet kantved) - kemm ar gevredigezh hec'h unan o vurutellañ he diazezoù (dreistbeliezh ar galloud stadel hag al le-alouriezh ouzh nep galloud stadel) eo a oa d'ober. Seurt burutelladur n'eo ket bet renet biskoazh, dre

ma oa seizet ar gristenion, dre vras, lealouriezh Sant Paol, lakaomp. Hep 'niderezh' avat, da lavarout eo, hep dezrannadur ur saviad politikel e sell da arverañ an dislavarou anezhañ evit loc'hañ ur gevredigezh, e oa barnet ar gatoliked d'an dic'halloud.

Moarvat o deus gellet ar re-mañ e Kembre derc'hel penn e-pad ur pennad dre m'o devoa hiniennou anezho neuze un dere kevredigezhel a zeroe dezho ul levezon vras en un taolead bennak (kv. degouezh rannvro vMynwy a zo bet meneget ganeomp meur a wech en danevell) ; seurt levezon avat a oa un dileerc'h eus ar gevredigezh c'h'laddalc'hel krennamzerel a oa diwar neuze o kilañ dirak lanv ar gevredigezh bourc'hiz stadel arnevez.

E gwirionez, ar pezh a zedenn evezh an hini a studi planedenn ar gatoligiezh e Kembre ez eo ivez kudenn roll kealiadurezhel ur gravez pe ur gredenn bennak e buhez ar c'hevredigezhioù. Kalz a varn ar gristeniezh hiziv dre m'eo deuet da vezañ ur gealiadurezh adal dibenn an impalaeriezh roman hogen en em c'houlenn a c'heller ha ne vije ket steuziet a-grenn ar Feiz kristen - evel ma reas nouspet sektenn all dinodet en impalaeriezh roman -- ma ne vije ket deuet da vezañ kealiadurezh ar gevredigezh europat er c'hantvedoù war-lerc'h. Sklaer a-walc'h eo koulskoude ez eo aet da get ar gatoligiezh e Kembre evit daou abeg ; diouzh un tu ne oa mui kealiadurezh ar riez ma aparchante Kembre dezhi ; diouzh un tu all e oa e oa ar gatoligiezh war ar c'hevandir zoken o koll ar roll kealiadurezhel-se adal an XVIIIvet kantved ; un azon eus ar gollidigezh-se ez eo bet dres emled emsav ar 'filozofed' ha, kenstur da hemañ, dizeriadur urzh ar Jezuisted a voe berzet e dibenn ar c'hantved-se. Gwelet hon eus avat e oa renet ar stourm katolik e Kembre dreist-holl gant Jezuisted a oa stummet war an douar-bras ha degaset ac'halese. N'eo ket dleet enta steuziadur ar gatoligiezh e Kembre d'an diouer a c'hred relijiel e-touez Kembreiz en trivec'hvet kantved ; er c'hontrol, er c'hantved-

se end-eeun e krogas an dreizh vetodistat a zlee ober eus Kembreiz unan eus devotañ pobloù ar bed) hogen hepken eus 'digevredikadur' ar gatoligiezh en hevelep prantad (me ' fell din lavarout dre se hepken n'he doa mui ar gatoligiezh lec'h na roll ebet er gevredigezh kembreat.)

Ur wech klevet kement-se e chom evel-kent ur gudenn c'hrevus hag a zo hini ar gwallheuliadoù a zo stag a-wechoù ouzh ar roll kealiadurezhel sammet gant ur gredenn bennak. Anat ne oa ket bastus roll kealiadurezhel ar brotestantiezh er Riez saoz e-pad an tri c'hantved a zo deuet war-lerc'h an disivoud ; ne oa ket bastusoc'h roll kealiadurezhel ar gatoligiezh er broioù latin en hevelep prantad. E pelec'h emañ diskoulm ar gudenn, ne ouzomp ket ; ne reomp nemet stigmañ argoulenn hep reiñ ur respont dezhañ.

Hiziv avat ez arvestomp er c'hornog dre vras ouzh trec'h ur gealiadurezh nevez, direlijiel avat, krouet gant ar vourc'hiziezh armerzhel ha stadel lerc'h-ouzh-lerc'h evit diogeliñ he c'hemeridigezh eus ar galloud ; gwall zidro e ranker bezañ evit krediñ e lezo ar gealiadurezh-se ul lec'h bennak d'ar Feiz kristen da zrestvevañ...

Meur a graf all a vefe da arsellout e ser an danevell emaoomp o paouez ober. Unan anezho e vefe moarvat kenveriadur ar c'hemm kealiadurezh e deroù ar prantad bourc'hiz kevalaour er XVIvet kantved ouzh an hini a c'hoarvez er mare-mañ dindan hon daoulagad, peurgent emdroadur an Iliz katolik er C'hornog abaoe ar Sened-Meur diwezhañ. Anat eo e c'hoarvez en Iliz 'bet katolik' un doare 'dreizh' pe 'zisivoud' mouchet o deus da bal azasaat ar gatoligiezh ouzh ur gealiadurezh stadel nevez (nemet digravezel en dro-mañ, pezh a laka an danvez disivoud a zo o c'hoiñ da vezañ arvarusoc'h evit ar Feiz eget an hini a zo c'hoarvezet pevar c'hantved zo.)

Daou graf all a vefe da sklaeraat.

Unan anezho a c'hellfed geriañ evel-henn : daoust ha gouest e vije bet Kembre dishual da zerc'hel gwelloc'h d'ar gatoligiezh? Kement-se n'eo ket anat hag a vije bet moarvat diouzh diorreadur ar Stad kembreat hag ezhommoù he folitikerezh. Skouer broioù Lec'hleñn a ziskouez avat dre vras ez eo troet pobloù hanternoz Europa war-du an disivoud evit abegoù a bolitikerezh diavaez.

An eil kraf a vefe ster ha disoc'h an enep-adreizh katolik ; e Kembre ez eo bet ur c'hwitadenn ha klasket hon eus diskleriañ perak. Padal en Europa latin n'hedeus graet an enep-adreizh nemet sevel ur voger-difenn da c'hortoz, hep lemel gwiriziennoù politikel an disivoud. An disoc'h eus kement-se ez eo bet n'eo ket bet diskaret an Iliz eno gant ar brotestantiezh, moarvat, hogen gant an emsav digravezet bourc'hiz. Ar c'hrafoù-mañ a vefe ivez da studiañ.

H.K.

=====

NOTENN.

Diabezet eo ar studiadenn-mañ war :

1) BEBB (W. Ambrose).- Cyfnod y Tuduriaid. 230p. 1939.

2) JONES (Emyr Gwynne).- Cymru a'r hen ffydd. 122p. 1951.

LEWIS (Saunders).- Meistri'r canrifoedd. Ar pennad:

"Damcaniaeth eglwysig protestannaidd" advoulet diwar "Efrydiâu catholig" 1947.

Notomp ez eus o paouez dont er-maez ul levr e saozneg diwar-benn istor ar gatoliked e Breizh-Veur, gant John BOSSY : The english catholic community. El levr-se e teuer da c'houzout ne oa nemet 70.000 katolik e Bro-Saoz e 1770. 800.000 pevar-ugent vloaz war-lerc'h hogen a-drugarez dan da envroadur Iwerzhoniz dreist-holl. E 1850 eo bet adsavet an urzhaz katolik (e 1829 e oa bet daskoret da'r gatoliked o gwirioù keodedel).

+++++

JIL EWAN

"EN DONVOR DA VREIZH"

(Un nebeut resizadurioù)

NOTENN : Ar gerioù diaes ha kalvezel a vo kavet e korf ar skrid da heul zo bet troet e galleg em oberenn 'EN DONVOR DA VREIZH' - IMBOURC 'H, Nnn 67-68-69.

=====

Anzav a ran ez eo re hir gerioù evel 'kevangevreadelouriezh' ha 'kevangevreadelezh', ha setu perak e kinnigan o c'hrennañ betek mont d'ober ganto, mar karer, 'kegelouriezh' ha 'kegelezh', rak petra ober a-hend-all ? Sevel troiennoù evel 'kevreadelouriezh' pe 'kevreadelezh anterin' hag int hiroc'h c'hoazh ? An diaester gant seurt gerioù eo ned eo ket gourdon c'hoazh genoù ar vrezhonegerion arnevez da zistripañ anvadoù kalvezel en o yezh. Moarvat e vije bet heñvel ar gont gant an alamanegerion ivez da vare Luther. Bremañ avat e teu bravik ganto gerioù hir-spontus, ya, reoù kalz hiroc'h eget hon re hirañ dimp-ni e brezhoneg, evel ma oar kement lenner desket tamm pe damm war an alamaneg.

=====

° ° °

Trugarez d'ar siner K.L. da vezañ lavaret e korf e bennad war niverenn 74 IMBOURC 'H (pp.139-145) diwar-benn va levr 'EN DONVOR DA VREIZH' ur wirionez a rankjen-me bezañ bet pouezet kalz muioc'h warni ivez: "Ret eo anzav," emezañ, p.142, "e c'hallfe/ar gevangevreadelouriezh/ er pleustr bezañ degemeret kerkoulz gant anveliourion digristen pe zizoue a ra eus an hinienn penntalvoud ha finvez nemeto pep politikerezh ; bez' e c'hall ivez diabell-weled ar gevangevreadelouriezh klotañ

gant prantad diwezhel ar 'gevunouriezh' pa ne vo mui ar politikerezh nemet dinazelerezh, eleze, melestradur an traoù e-lec'h melestradur an dud."

"Goanag heulavelour" (1) eo 'hevelep uhel' eme c'hoazh K.L., "hag an holl a rank bezañ a-du gantañ evel m'emeur a-du gant ar baradoz."

Ya, ret e vije bet din lavarout hag adlavarout seurt gwirionez, hogen pa lenner gant aked pezh am eus skrivet, e weler evelkent em eus diskouezet, dre va levr, war-bouez arroudoù niverus ha resis, pegen intret eo va c'helennadurezh gant hini an Aviel, Aviel rik Jezuz-Krist Hon Salver, o kas, a-dra-sur, d'ur baradoz disheñvel diouzh hini anveliourion pe gevunourion digristen. Pezh a dalv da lavarout ne gredan er gevangevreadelouriezh NEMET HAG AWENET E VE, EVIT AR PEB NEBEUTAN, gant spered ar C'Hrist, o lakaat ne c'hallfe ket bezañ peurintret na peurdrelusket gantañ raktal. Diskleriet-fraezh em eus ivez dre va levr (pp. 170-171) e tistaolen kement milvedouriezh a zo, na pa ve kravezel, evel hini lod Protestanted ha hini 'Jehovahourion' a bep seurt, pe neuze, kement 'oadvezh aour' politikel evel hini ar gevunourion gant o 'frantad diwezhel'. Pezh na dalv ket da lavarout ne zleomp ket lakaat hon spered atav da labourat ha d'ijinañ hentenoù nevez evit gwellaat saviad ha dere an denion war an douar. Dec'hmegiñ ned eo ket evel ma'm eus lavaret (p.171), magañ valgori, eleze, huñvre vrizh, pe neuze ne dalvje ket ar boan arnodiñ

(1) HEULAVELOUR ('eschatologique'). Gwell e vefe lavarout 'OLAVELOUR' evit diskouez emañ ar ger o tont eus 'olaf' ('diwezhañ holl') e kembraeg, hep diaesaat an traoù gant ar gerentiezh a zo etre 'heul' e brezhoneg hag 'ol' e kembraeg. Ivez, evit diforc'hañ diouzh 'eul', 'eulad', bet degemret gant KISSADED evit treiñ 'signification' e galleg. Diwar an hevelep 'eul' e teu dimp ivez 'kanteul' hag 'arganteul' : 'signifiant', 'signifié' e galleg.

netra. Diouzh an tu all, evit a sell an 'olavelouriezh', diamsteriek ha fraezh-mat eo ivez va c'helennadurezh, o vezañ ma tistaolan kement olavelouriezh nad eo ket kristen. N'eus nemet adlenn peurgent pezh am eus skrivet (p.213) : "Ur fazi (...) da dreiñ diwarnañ a vefe krediñ e vo Rouantelezh an Neñvoù dianlenad (heuliad arbennet) un argerzh istorek (...) Gant donedigezh trumm Rouantelezh an Neñvoù e vo lakaet un termen d'an Istor." Splann eo n'he deus seurt olavelouriezh mann ebet da welout gant hini ar gevunouriezh. Ha mard eus tud a fell dezho ober 'hollveskerezh kredennoù', evel ma lavar pelloc'h K.L. e traoñ ar bajenn 144, ez int dieub, mar karont, da lakaat skritell ar gevangevreadelouriezh war o c'healiadurezh ! Hevelep kevangevreadelouriezh avat ne VO BIKEN VA HINI DIN. Ha Doue ra viro na vije kennebeut hini Vreizh nag Europa ! Ouzhpenn ma ne welan na gwerc'h na frouezh mat ebet dezhi rak, evel ma lavaran dre va levr ha peurggetket p.154 : "ne vo tu ebet d'ar gleizelourion na d'an anveliourion na d'ar vrizharaogelourion a bep gobari da zisoc'hañ war o baradoz peurvat keit ma talc'hint da boellata kement ha poellata, o klask dantañ o lost evel chas klañv. Ne c'hellint akuitañ ganti nemet dont a rafent dre hantererezh ar gevangevreadelouriezh d'emouezañ adarre ouzh talvoudoù dileles awenet e gwirionez gant spered ar C'Hrist hag Eñ bividikaer pep keal ha pep ober. Salv e teufe an engroezioù da verzhout bremañ pegen sklerijennus eo spered Salver ar Bed!"

Hag evit gwir, penaos ha gant piv e vez roet o stummadur da seurt 'dispac'hacherion' hiziv an deiz ? Daoust hag ez eo gant blenidi, boas d'embrederiañ ha d'emdredañ, eleze da'bediñ en ur stumm bennak ? Tamm ebet, evel ma resizan p. 195: "N'eo ket seurt dispac'h (an hini peurzalc'hus!) a fell din herouezañ. Ouzhpenn ma tenn hevelep dispac'h da sammañ nac'herezh-rezid war an dud, deiz goude deiz, pred goude pred, koulz lavarout. Gantañ ne vez roet peoc'h ebet da nikun. N'eus ket an-

ezhañ kennebeut un dispac'h diabarzhel, kaoueddel evit an hiniden, o vezañ ma roer lañs d'ar poellata war an embrederiañ. Ha n'eur ket hep gouzout e vez kalz pinvidikoc'h an ober diwar embredererezh a zo frouezh un emdred yac'h, eget diwar ar predererezh hep endro yac'h a-walc'h ha, kentoc'h reiz, diwar ar poellataerezh gouez, renet e-kreiz ar safar hag ar c'hadabuilh, diouzh giz ar gleizelourion hiziv an deiz. En diwez ez eo liammet pep oberberzhel ouzh buhez don an ene o tarzhañ diwar-bouez an emdred hag an embredererezh, ha pep ober nac'h-el ouzh ar poellataerezh hag ar predererezh diyac'h-us, klañvidik, a zo bet gwall blanedenn kalz re a vezourion betek-henn, deuet ma oa o empenn da vezañ trec'h d'o ene."

Hag evit a sell ober eus an hinienn denel pe hiniden 'penntalvoud' ha 'finvez pep politikerezh' evel ma lavar K.L., ret eo diskleriañ fraezh amañ hag embann uhel ned eo ket seurt uhelvennad frouezh poellataerezh an danvezelourion arnevez, hogen kelennadurezh Doue nemetañ, eleze un Diskuliadurezh tapet ganti he barrvleuniadur war deod Salver ar Bed pa veze o pareañ hini dre hini tavanteion Israel en e vare. Pet avat e-touez hon anveliourion, hon marksourion hag hon c'hleizelourion andoueat a oar hiziv andeiz emañ ar peb gwellañ eus o mennozioù o sevel d'an Aviel bet prezeget abaoe 2000 vloaz gant diskibled Jezuz-Krist, ar Gomz Emgreudet ?

D'ar goulenn graet gant K.L. (p.144): "Ha maz eus un dispac'h speredel da ober, war be-seurt diazezoù e vo graet ? " e kav din enta em boa roet endeo ur respont hir, spis kenañ hag aes da welout, pa gemerer ar boan da studiañ donoc'h va levr.

§§§

Fazi bras a ra moarvat hon c'heneil K.L. o tiskouez evel ur'reizhiad' ha zoken ur'renad' ar pezh nad eo nemet ur gelennadurezh. Ur Raktres

(ur Erged, evel ma lavarer bremañ e brezhoneg ski-antel)pe, gouez din (p.171) ur CHEMEDENN (hag an hini wellañ, na petra!) ned eo ken ar gelennadurezh kevreadelour kristen erbedet em oberenn, evit ma c'hallfe an denelezh dont "DA VOAZAÑ MUIOC'H-MUI OUZH AN HONTKENDERC'HAÑ, DEZHI, KELLIES GWECH HA MA VO O PAOUEZ ABERZHAÑ D'AN DROUG, DA VEZAÑ E TRO D'ADKAVOUT, HEP DIAESTER EBET, AR C'HEMPOUEZ HAG AN NERZH RET EVIT DISTREIÑ RAKTAL D'AN HEVELEP HENTENNOU HOLLEL BET KINNIGET DEZHI DIAGENT, da lavarout eo, dres d'ar re a zo bet miret e levrioù par da hemañ, gwelloc'h avat HA KLOKOC'H c'hoazh eget hemañ, evel reizh."

Aes eo gwelout ned eo ar gelennadurezh a roan amañ nemet un arvez prederouriel ha gwirioniel eus ar gevreadelouriezh AMAEZHIADUREL NEMETI a vez oc'h amparañ renadoù gwerc'hel hiziv an deiz war an douar. Pemp pe c'hwec'h pajennad lakaet en ezkont, ne bledan tamm ebet, koulz lavarout, gant arvez armerzhel-kevredadel ar gevangevreadelouriezh. Rak va soñj din eo o deus bediz da barraat, da gentañ penn, ouzh un enkadenn speredel. Kompren a ran moarvat e tlefe va labour bezañ pengennet un deiz gant arroudoù fetisoc'h diwar-benn an armerzhelezh-kevredadelezh. Hogen dre did e vezan o treiñ war ar brederouriezh pe war ar wironiezh pa grogan da verat kudennoù. Ken, mar degouezhje din adarre embann ul levr diwar-benn reizhiad klok ar gevangevreadelouriezh, moarvat ne c'halljen ket tremen hep intrañ pep mennoz ha pep dodenn gant spered an Aviel, eleze degas war ar stern kalz danvez o tennañ d'ar brederouriezh ha d'ar feizoniezh. Un dra nevez avat a ginnigan gant va levr, rak ar mennad kristen a vagan-me diwar-benn ar gevangevreadelouriezh zo anezhañ ouzhpenn un dilhad : ur c'hroc'hen ha, zoken, ur c'hreud nevez eo, bet roet ganin evit ar wech kentañ d'ur gelennadurezh kevreadelour. Ya, labour ur SPERED BREZHON HA BREZHONEGER eo ar pred-eridennoù a gaver dre va levr. Setu perak en deus graet mat K.L. diskleriañ en e bennad (p.145) e oa

tu da zegemer ar gevangevreadelezh "evel renad ur riez vrezhon, evit ezhommoù pobl ar Vrezhoned..." Ha sed ar pezh a lavaran-me ivez diouzh va zu (p. 173) gant an arroud da heul : "Ar gevangevreadelouriezh chomet dianav betek-henn a vo tra an Emsav brezhon, mar kar, e kement ha ma fello da hemañ ober anezhi e dra, enep da bep kealiadurezh hollvedel arallekaus, sev, enep da bep istoregezh arallek. Un ober piaouel da Vreizh e c'hall dont da vezañ, eleze un ober diles, emsavek hag istorek d'hon c'hennel, hep ma ve ret hiviziken d'hon emsav brezhon devoudel stigmañ kudennoù arallek e diarselloù un istoregezh arallek, evel maz eo bet kont gant ur bern luskadoù dre amañ, adalek hini 'POBL VREIZH' U.D.B. hiziv, en ur dremen, eveldres, dre reoù ar C.E.L.I.B. hag ar B.R.E.I.S...." Ya, un ober piaouel da Vreizh, un ober ganet e Breizh en ur stumm bennak. Gant komzoù disheñvel : ur gevangevreadelouriezh vrezhon.

Hogen larkoc'h e taolan-me va selloù, treizhañ ma ran war ul lestr kristen 'en donvor da Vreizh', ha setu perak e lavaran diouzhtu goude an arroud rakveneget : "rak talvezout a rafe neuze ar gevangevreadelezh evel ur stern diles DA BEP EMSAV KENELEL DRE AR BLANEDENN da drehontiñ pep istoregezh arallekaus." Hemañ eo e gwirionez ar ster a roan d'an 'hollvedelouriezh' stag ouzh ar gevangevreadelouriezh hag a vo komzet pelloc'h diwar he fenn. N'ouzon ket avat ha treiñ a ray seurt kelennadurezh un deiz bennak da 'reizhiad' ha da 'renad', reoù vrezhon hag hollvedel en un douez. Evit bremañ n'he deus enta kement arguzenn a vez o tont gant K.L. diwar-benn daioni pe falloni ar gevangevreadelouriezh nep diazez na kantreizhadur.

Treiñ a ra abegadennoù K.L. dreist-holl en-dro d'un nebeut kealioù evel an hollvedelouriezh a gavan gwell kinnig dindan ar stumm 'hollveziadelouriezh' ; da c'houde, ar Barnour-Meur (a zo kentoc'h en devoud al Lez-Uhel hag an Uhelvarnerezh

kevreadel) ; pelloc'h an armerzhelouriezh, ar Sevenadurezh hag ar stuzegezh (kentoc'h eget ar sevenadur) ; kudenn ar riegozh hag, en diwezh, an En-savadurioù.

An darn-vrasañ eus ar c'healioù rakveneget zo, forzh penaos, stag an eil ouzh egile.

I. HOLLVEZIADELOURIEZH (Hollvedelouriezh K.L.)

Peseurt hollveziadelouriezh emañ-me o tifenn evit gwir ? Da gentañ an hini gristen e kement ha ma lavar an Aviel e tleer astenn ur silvidigezh klok d'an holl bobloù ha denion, dre maz int holl bugale d'an hevelep Tad. Seurt hollveziadelouriezh n'eus netra da rebech outi. Diouzh un tu all, pa studier kudenn an hollveziadelouriezh dindan un arvez muioc'h prederouriel hag ivez dinazel, e c'haller distreiñ war ar pezh a lavaran uheloc'h. An hollveziadelouriezh erbedet ganin n'eo ket an hini a vez diazezet war un istoregezh arallek hag arallekaus kinniget d'ar broioù ha d'an denion gant strolladoù politikel 'etrevroadelour' ; rak re vras e ve neuze, da'm soñj, ar riskl evit ar pobloù da gouezhañ dindan levezon pe grabanoù un impalaeriezh pe ur riez nemeti. Sed ar pezh a felle din merkañ uheloc'h dre venegiñ 'STUR' alamagnkreizour gwechall dre amañ pe hiziv ar C.E.L.I.B. hag ar B.R.E.I.S. frañskreizour. An hollveziadelouriezh n'eo ket kennebeut, evel ma lavaran (p.171) "al liesvroadelezh veziadus ha diziforc'h tonket dezhi disoc'hañ war ur meni bedvroelouriezh reizhiadekaet (eleze 'hollvedelouriezh' hervez eulad rik ar ger) na rafe nemet paouraat an denelezh e gwirionez, war-bouez krennañ war he barregezhioù sevenadurel ha, dre heulret, speredel ivez." Spisaat a ran en diwezh doare va hollveziadelouriezh kevangevreadelour gant an arroud da heul (p.173) : "Evit ur bobl ober hec'h istor a vefe muioc'h-mui diwar neuze ober ivez Istor UN DENELEZH a vefe amparet en he fezh, evel Dirvoud ha Gwirvoud, gant pep tudad ha neket gant ur meni POBL PLANEDENNEL MOGEDEK a vez

speredoù rousseauat o faltaziañ bepred. Emañ war-nomp mare ar Spered Glan (...)" Ya, mare ar Spered Glan ha neket hini ar riezvroadelouriezh vrizhholl-veziadelour diouzh giz Napoleon ha Bismarck pe diouzh giz ar varksouriezh 'etrevroadelour' ganet e derou ar c'hantved-mañ gant, prestik goude en he fenn, tudennoù euzhik evel Stalin.

II. BARNOUR-MEUR

Fazi bras a ra K.L. o kinnig ar 'Barnour-Meur' kevangevreadel evel un doare 'Pab Krennamzerheñvel'. Amañ c'hoazh e tlefe ar buruteller bezañ lennet spisoc'h kement arroud am eus embanet o tennañ d'al Lezvarnerezh kevreadel ha kevangevreadel, dreist-holl pa lavaran etre traoù all (p.45) e ve mat "gwelout ar Stadoù Kevreet hiziv e pep Riez Kevreadel o kemer perzh en EZHOLIDIGEZH Barnourion al Lez-Uhelañ, gant ar pouezek maz eo kefridi hevelep ensav e buhez ar Gevreadiezh. Un amkan eo hemañ HAG A RANKO BEZAÑ TIZHET DINDAN REN AR GEVANGEVREADELEZH." Seurt 'pibion', - rak anv zo amañ eus kement barnour a vez war diriegezh ur Riez Kevreadel, ha neket eus unan hepken, - a vefe dilennet neuze e gwirionez, gant strolloù-dilenn kalz ec'honoc'h eget reoù an Iliz da geñver dilennidigezh ar Pab ! Nemet, a lavaro darn c'hoazh gant K.L. e chomo bepred an uhelañ barnour, forzh penaos, evel un doare Pab e penn ar Gevreadiezh, peogwir e c'hallo levezonañ evit mat pep disentez diwezhañ! Va respont da seurt arguzenn zo e ve arabat kammeskañ keal ar Pab pe hini ur 'Gourdad' bennak gant keal Dreistevezh ar Gwir. Arouez pep gwerinveliegezh wirion eo Dreistevezh ar Gwir, anezhi unan eus brasañ pennvoniou ar gevreadelouriezh. Ha derc'houezer NEMETAÑ hevelep pennvon eo kement barnour kevreadel a zo. Hemañ an hini eo a vez neuze an atebeg nemetañ, adalek ma vez anvet en ul Lez bennak. Pezh a dalv da lavarout ne vez tu ebet diwar henn evit den na stroll ebet da lakaat Dreistevezh ar Gwir da dalvezout. Sed ar pezh a lavaran dres

(P.64) gant ar gerioù da heul : "Soñjomp ervat ivez ned eo na d'ar werin na d'al levierion na da nep leviadezh digevredik bennak diskleriañ peur e vez levezon pe oberoù un hiniad lavaret o noazout ouzh rezid ha briegezh ar re all, hogen d'ar Barnour nemetañ, ensavet evit se dre gefridi naturel ha kantwir, gant ma vo moarvat emren, neptu ha direbech hevelep kefridi. Koll enta o gwir da vezañ betek-evel a rafe NEP LEVIERIEZH (eleze, kement Pab ivez) pe strollelezh, gronn pe strolladur, uniad, luskad pe strollad politikel bennak a glaskfe kemer lec'h ar Barnour dre un hent eeun pe ameeun. N'eus netra brasoc'h war an douar eget kefridi ar Barnour pa vez e kenhoal gant ar Veli Gantwir, sev gant ar Riez hag Stad diouzh un tu, ha, diouzh un tu all, gant ar werin, engwiriet maz eo houmañ ivez, e diarselloù ar gevangevreadelouriezh, DA GEMER PERZH E DILENNIDIGEZH SEURT ARC'HGWIRAOUR."

Hogen, evel ma lavaran (p.75) arabat e ve kemmeskañ kennebeut Barnerezh gant Gouarnamant: "Ra vo taolet pled ouzhpenn ouzh un dra kantvezet ganin evel azon pennañ ar gevangevreadelezh da zont: gant hevelep renad ne vo biken aon ebet da gaout e klaskfe al Lez-Uhelañ kemer lec'h ar gouarnamant kevreadel. Ne vo biken ar barnerezh nemet un arc'hgwiraouriezh o werediñ dre berzh levezon an talvoudoù speredel a skedo war he skaradennoù muiget diwar'nerzh ar wirionez dezvel' stag ouzh he disentezioù."

Degont ar Barnour n'he deus netra da welout gant hini ar Pab, rak tra ma oa unpennel kefridi kravezel ha politikel ar Pab gwechall, e vo moarvat muioc'h-mui gwerinveliel hini ar barnour da vihanañ e stern hon gweriniezhoù kornogat. Hag engwiriet e vezer da lavarout e vefe kefleunoc'h c'hoazh e stern ar gevangevreadelezh kristen diouzh skouer an hini a ginnigan. Disheñvel-mat neuze zoken diouzh ar Pab erouez evel Penn Gouarnamant, e vefe ken disheñvel-all ar Barnour Kevreadel dioutañ ha peurgetket diouzh hini ar Grennamzer e par ar gealiadurezh.

III. ARMERZHELOURIEZH

Dindan stumm goulennoù e kendalc'h da c'houde K.L. gant e vurutelladenn e-keñver galloud armerzhel : "Hor bed e-giz m'emañ," a lavar K.L. "a zo diazezet war ar galloud armerzhel (...). Ma vefe diazezet ur Riez Kevreadel wirion en Europa, lakaomp, evit kregiñ, daoust ha reolet e vefe ar galloud-se gant ar pobloù evit keloù se ?" ... Pe daoust hag-eñ ne vo ket reolet pep tra, armerzh ha stuzegezh "gant ar riezoù o devo ar mu-iañ a c'halloud armerzhel er c'hevread?"

Amañ c'hoazh e chom hon buruteller hep teurel pled ouzh ar pezh am eus skrivet en ur daolenniñ dasparzh ar veli e stern pep kevreadiezh wirion, - kuit a gomz evit bremañ diwar-benn nep reizhiad kevangevreadelour a c'hallfe c'hoazh, evel reizh, bezañ kalz perveshoc'h. Ne welan ket penaos e ve tu da sevel seurt abegadenn ouzh va c'helennadurezh, nemet ha droukveskañ a rafed adarre 'kengreriad' ha 'kevread', evel ma reer pa c'hwiter meizañ ster don ar gevreadelouriezh. Ha setu dres ar pezh a c'hoarvez hiziv an deiz gant ar yoc'h ha betek gant ar c'houvriaded dre wall berzh ar stuziadur jakoninek a vez gourlakaet war an holl e stern ar C'hwec'hkogneg villiget m'emaomp o vevañ. E gwirionez, e stern ar Gengreriad eo e vez gwelet ar Stad kreñvañ oc'h ober he renkoù, neket war dachenn an armerzh hepken, hogen war bep tachenn, koulz lavarout, o vezañ ma ne vez kemmet netra e-keñver beli gant seurt kevredad politikel. Skouer Kevrediniez Europa hag Aozadurioù Bedel zoken evel U.N.O. zo splann hiziv an deiz e seurt par.

E stern ar C'hevread e van kevatal nerzh ha beli pep Stad Kevreet ; ha petra bennak ma c'hallje ur Stad lavaret bezañ kreñvoc'h en devoud eget ar re all war dachenn an armerzh, he levezon avat ne vije ket brasoc'h evit kelo, reolet ma vije bepred gant ar Vonreizh, gant gouarnamant ar Gevreadiezh ha gant al Lez-Uhelañ. Saviad ur

oc'h ober al lezenn d'ar re all n'eus tu ebet evitañ da vezout e par nep kevread rik. N'eus ster ebet enta gant abegadenn K.L., da vihanañ mar fell dezhañ komz an hevelep yezh ha me, eleze diforc'hañ krenn-ar Gengreriad diouzh ar C'hevread. Ra lenno neuze hon c'heneil (p.54) pezh a lavaran diwar-benn seurt kudenn, paouez ma ra da vezañ politikel hag armerzhel evit dont da vezañ bonreizhel na mui na maes adalek ma vez ensavet gwir gevreadelezh : "Anat e teu dreistelezh ar gevreadiezh da vezañ gant ar plaenadurioù am eus graet betek-henn (...). Un aozadurezh skort ha tremeniat eo hini ar gengreriadiezh. Klask a ra tizhout ur pal dic'hallus : e-lec'h isurzhañ dreistbelioù ar riezoù d'un aozadur kevaner, e striv en aner d'o c'henurzhañ. Torret e vez neuze pep kempouez kevreadel e GOUNID AR RIEZOU a van mestr, neket war o zachenn dezho hepken, hogen war hini ar gevelstrollelezh, gwashañ pezh a zo. KEN MA VEZ TONKADUR HOUMAÑ EN O DIVIZ PE GENTOC'H E DIVIZ AR RE GREÑVAÑ. Diwar-henn e vez barnet seurt kevredad d'an amc'halloud, gant an emstourmoù, an erez hag an arvelloù diziskoulm a vez lod pemdeziek ar vuhez politikel en e stern."

Diwar ma vo lakaet gwir gevreadelouriezh da dalvezout dre ar bed, ne vo tu ebet kennebeut evit ur vro pe ur Stad lavaret da reoliñ pe da zistrujañ sevenadur pe stuzegezh ur vro pe ur Stad all e stern an hevelep Riez Kevreadel. Rak evit se dres eo graet ar gevreadelouriezh, evit ma ve trec'h al Lezenn d'an Armerzh, trec'h ar Spere d'an Droug. War-bouez nebeut avat em eus stignet an hevelep goulenn ha K.L. pa respontan d'an arguzenn da heul (p.200) o tennañ d'ar galvezveli danvezelour evel elfenn bennañ ar berzh graet gant pep riez war dachenn ar 'galloud armerzhel'. "Ne c'haller ket," a rebarbo lod, "mont enep d'ar galvezouriezh tapet ganti kaout war ar politikerezh ur c'hrog ken bras maz eo deuet pep politikerezh da vezañ kalvezveli e par kement gouarnamant a zo..."

Hag e respontan : daoust hag-eñ n'eus ket tu da gemmañ ar finvezelezh danvezelour merket betek-henn d'ar galvezouriezh ? Daoust hag-eñ n'emañ ket denelezh dreistkalvezekaet hon broioù diorreet o huanadiñ endeo, en he donañ, war-lerc'h ur finvezelezh disheñvel diouzh ar soulgencerc'hañ, paz eo anat bremañ d'an holl (...) emañ an danveziou krai o vont war rouesaat bemdez ? Hag o lakaate c'hallfe c'hoazh ar galvezourion, da heul distruj an danveziou trevekaet hiziv, tapout kenderc'hañ reoù all diwar vammennoù disheñvel ha dianav dimp evit c'hoazh, daoust hag-eñ ne vije ket tonkad euzhik an denelezh, forzh penaos, bezañ mouget korf hag ene, dindan ar bernioù spontus anezho, mar kendalc'hjed gant ar soulgencerc'hañ evel disoc'h ar c'hevzerezh politikel ?

Deuet eo ar mare neuze da verkañ d'ar galvezouriezh hag, en un douez, d'ar politikerezh, ur pal disheñvel graet, war un dro, da vezañ un diskoulm denek d'an enkadenn : dleet eo e vefe anezhañ UN DASPARZH PLANEDENNEL REIZH diwar un tolz goñvorek a vadoù danvezel na harzfe ken ouzh diorreadur bezoud an den, e gounid an danvezelouriezh enstag ouzh ar c'haoud, hemañ risklet, er pleustr, da goll evit mat un denelezh a chomfe betek dic'hal-loud d'emskiantiñ seurt all ebet gwelloc'h."

Ret eo din diskleriañ spisoc'h amañ em eus divizet embann va levr peogwir e kredan start ne bado ken armerzhelouriezh danvezelour hon remziad ouzhpenn hanter-kant vloaz d'ar muiañ. Hogen pa ne greder ket start en un dra bennak e chomer emichañs war vordo evel K.L. gant e c'houlennoù niverus (p.144). Padal, ha petra bennak maz eus arouezioù resis o tiskouez ez eo krog AR REMZIADOU YAOUANK ENDEO DA HEUGIÑ GANT AR STUZEGEZH DIWANET DIOUZH HON ARMERZHELOURIEZH DANVEZELOUR e tleer koulskoude herouezañ adalaek bremañ renadoù graet evit divarc'hañ ha distrujañ arbennoù hevelep stuzegezh, eleze an div gevalaouriezh riezalour, an

hini digevredik hag an hini gevredik a zo hiziv o stourm an eil enep eben e sell da vestroniañ ar bed. Hag ar benveg nemetañ evit trec'hiñ war hevelep gwalenn zo, hep mar ebet, ar gevegevedelouriezh. Ne c'hoarvezo neuze netra dre ar bed, ne dalvo nep kelennadurezh kevreadelour evit mat keit ha ma ne vo ket bet dilamet kuit an arbennoù rakveneget, gant skoazell kement luskad all a vefe enebet war un dro ouzh ar riezalouriezh hag ouzh an div gevalaouriezh vedel mac'hom. Setu perak n'he deus ster ebet un ar-guzenn evel hini K.L. (P.144) diwar-benn ar sevenadur (sevenadurezh) emañ o vont da studiañ bremañ.

IV. SEVENADUR (sevenadurezh)

"Daoust," eme hon buruteller," ha kemmet e vo sevenadur ar C'Hornog a zo gouestlet d'ar beveziñ danvezel, war zigarez ma vo bet diazet ur reizhiad kevreadel, - ha pa ve unan wirion, - en Europa?"

E gwir ne welan lec'h ebet da seurt enebadenn amañ, rak ur goulen eo hemañ hag a dalv evit kement kelennadurezh nevez, mat pe fall, a vez o tiglorañ. Daoust ha kemmet eo bet war an taol gant Iliz ar grennamzer sevenadurezh pagan Europa ? N'eo ket bet, pell ac'hano! Ar peb retañ neuze zo da gentañ dibab ar sichennoù gwellañ war an dachenn vonreizhel, e par an holl Ensavadurioù, ha digeriñ an hentoù speredel gwellañ, d'ur sevenadurezh nevez da vleuniañ.

Abegoù sonn zo hiziv da grediñ, neket e tleo, - rak diwezhatoc'h hepken e vo gwelet an dlead oc'h anadiñ, - nemet e RANKO ar pobloù distreiñ da vrasoc'h kedvreuregezh ha d'ur gwir speredelezh nêvez. Perak se ? Ac'hanta, peogwir - evel ma lavaran dre va levr (p.60) - ez eo kondaonet Bediz d'ar youl-vat, mar fell dezho trebadout. Sed a zo bet komprenet mat kenañ gant tud zoken digristen evel ar Gall Malraux hag eñ o vont betek embann e ranko ar c'hantved nesañ bezañ unan kravezel-dreist pe neuze ne vo ket anezhañ. Penaos intent se ? War a gredan, en doare-mañ : goude bezañ bet rediet

gant an amveziadoù d'ar c'henemglev, e teuy bediz, deiz goude deiz, da welout e vo un dlead evito trehontiñ seurt redi hag ober eus ar seurt destrizh naturel UN DLEAD DIEUB evit kement pobl a zo, pezh a vo endeo arouez an dihun kravezel ha speredel rakveneget. Darev e vo neuze ar bed da zegemer evit mat Ensavadurioù par d'ar re am eus plaenaet gant va levr hag a ranko bezañ dedalvezet d'hon Europa da gentañ-penn. Deuet e vo neuze d'e dermen treuren ar galloud armerzhel danvezelour a zo bremañ oc'h ober e renkoù warnomp ;deuet e vo tarzh ur sevenadurezh kalz denekoc'h evit pobloù ar blanedenn.

V. RIEGEZH

Pa vez o skrivañ (p.145, Nn 74) : " (...) n'eus ger ebet (gant EN DONVOR DA VREIZH) diwar-benn riegezh wirion ar riezoù hag al luoaz a zo ar gwarant anezhi (...) "e tiskouez K.L. evit gwir n'eo ket bet meizet mat gantañ an diforc'h a venegen uheloc'h etre 'kengreriad' ha 'kevread' na, kennebeut, etre 'dreistbeli' evel merk ar riegezh klok e stern pe hep ar Gengreriad, hag 'emveli' evel merk ur riegezh ken klok-all, hogen e stern ar C'Hevread gwirion nemetañ. Sed ar pezh a zo bet plaenaet ganin (p.186) pa lavaran : " Un diforc'h bras ez eus etre 'emveli' ha 'dreistbeli'. Heñvelster eo an eil ger hag egile da 'RIE-GEZH', 'emveli' o talvout evit riegezh strollelezhioù liesseurt : TUDADOÙ (1), kevredadoù h.a. ha 'dreistbeli' o talvout evit riegezh diharzveli ar riezoù hiziv. En horgant ar C'Hevread rik a vefe arc'hoazh, lakaomp, oc'h amparañ Europa, n'he defe ster ebet ken ar riegezh, eleze, an DREISTBELI a zo, da skouer, gant ur Strollelezh EVEL FRANNS HIZIV AN DEIZ, seurt diharzveli o vezañ dres diazezet war al Lu Gall (en un doare damkaneloc'h-

(1) Eleze, Stadoù ha riezoù kevreet ivez, hervez an digemm a ginnigan (p.93) e ve lakaet etrezo war dachenn ar genelelezh.

damkanañ avat hiviziken, pep hini henn goar mat, an diazez gwirion o vezañ ar 'Reizh Etrevroadel' ma vez ganti harpet an 'Establishment', ha gwarezet keal ar riezvroadelouriezh hollveliek). Perak, emit-hu, n'he defe mui ster ebet hevelep dreistbeli c'hall e stern Unaniezh Kevreadel Europa ? Peogwir e vefe neuze dereñet Frañs da vent ar 'Francia Occidentalis' gent pe dost, deuet ma vefe, evel ar strollelezhioù all, da vezañ ur Riez Kevreet rez hag emveliek, eleze, ur genelvroadenn, tennet diganti avat pep diharzveli, evel digant ar re all, evit mad he fobl ha mad an tudadoù all amezek dezhi. Setu pezh a zo da gompren dindan rann vonreizhel va levr, dreist-holl pa vezan (p.52) o teskrivañ Dasparzh Devoudel ar Veli e Stern ar C'Hevread : "Evel meneget uhel-oc'h, engwisket e vez d'ar gevreadiezh kembelioù kevastenn ouzh tiriegezh ar riez en he fezh. Rak ne weler ket mat penaos e c'hallfe c'hoazh ar Stadoù Kevreet ober arver anezho gant berzh war dachennoù arbennik evel, da gentañ-penn, tachenn an Difennerzh Milourel. Setu perak e vez kendeuzet Luoaz ar Stadoù en ul lu nemetañ oc'h arc'hwelañ e gourc'hemenn ar gouarnamant kevreadel. Dre heulret e vir hemañ war e gont pep leviadur ha pep reolerezh war lod ijinerezhioù ampegadus d'an difennerzh evel, da skouer, ijinerezh an armoù pe c'hoazh an ijinerezh derc'hanel. Heñvel e vez ivez an traoù e par al Leviadurezh Estren. Diouzh savboent ar broioù all enta e vez ar gevreadiezh oc'h anadiñ dirak o selloù e giz ur riez unelour. Ganti - ha ganti hepken - eo e c'hallont skoulmañ darempredoù dihanterat, rak n'eus nemeti oc'h engouestlañ kement Stad Rez gougevanet outi, dianavezout ha ma ra liested al leviadurezhioù estren goubarzhel a vez o tevoudañ horos, breud ha gwanded e par ar vuhez etrestadel."

Ken pduezek-all e vez ivez kefridiezhoù ar gevreadiezh war dachenn an armerzh hag ar c'hellid, peogwir e vez kevreadekaet moneiz, bankoù, kevros ha kellidsteuñv. Un dra vat eo, rak bennozh da

dolz ken bras ha da natur he c'hembelioù, ne gav seurt kevredad skoilh ebet war e hent evit kas da benn, gant berzh leun, an trevelloù maz eo bet ensavet evito.

Diouzh o zu e vir ar Stadoù Kevreet en o c'herz an holl gembelioù chomet hep bezañ bet fiziet er gouarnamant kevreadel diwar dezveneg bonreizhel ežpleg. Kevastenn e vezont ouzh tiriegezh ar Stad a sell kement danvez a vez barrek houmañ da reoliñ war-eeun : kelenneriezh, dezvadur keodedel ha kospel, treuzdougerezh etrestadel, yec'hed, kedskor. Ha n'eus tu amañ emichañs da venegiñ nemet un nebeut skouerioù hepken."

E gwirionez, pezh a vez oc'h amparañ riegezh kefleun ha rezid gwirion an holl strollezhioù kevreadel, en o mesk, evel dres, ar c'henelevroadennoù, zo an emveli nemeti, ha neket an diharzveli diabarzh-diavaez. Ne vez ket deveizet enta keal ar riegezh e diarselloù ar gevreadelouriezh evel ma vez graet e diarselloù ar riezvroadelouriezh na pa ve kengreriadel pe get. Hogen petra ' dalv hiziv an deiz e gwirionez, daoust d'o luoz, dreistbeli diavaez seurt strollezhioù riezvroadelour ? Nebeut a dra, hep mar ebet, da vihanañ mar degemerer ez eo kondaonet endeo pobloù ar bed d'ar youl-vat rake peurt degont, da betra e talvezfe kaout luoz ha dafar-brezel ? Sed ar respont a roan (p.130) pa lavaran : "Abaoe un nebeut bloavezhioù (...) o deus meizet gwir gevreadelourion, - tud avat hep nerzh fetis evit c'hoazh, - e c'halled adalek bremañ spurmantiñ an deiz ma vefe ensavadekaet gwerinveliezh diles ha gwerc'hek war an douar, peogwir ez eo droukvarnet hag evel boulc'het endeo dreistbeliegezh ar riezoù dre berzh kevamzalc'hiezh ha kengrediezh ar pobloù o vont bemdez war gadarnaat. Diazezet ez eus bet betek-henn pevar bloc'had dre ar bed : ar Stadoù-Unanet, Unanijezh ar Soviedoù Sina ha pezh a vez anvet an Trede-Bed, rak tu zo da sellout kevanenn ar pobloù isdiorreet evel ur bloc'had en diavaez da Sina bet dilezet ganti evit

gwir lazenn an Trede-Bed da vare brezel ar Bangla-Desch e dibenn ar bloavezh 1971.

Ur c'hammed eo ar pevar bloc'had rakveneged davit peurgevreadekadur (ne lavaran ket unneuziekadur) pobloù ar blanedenn, pezh na c'hoarvezo emichañs nemet dindan bell ac'hann, pep hini henn goar mat, ha n'eus den touellet e seurt keñver. Un deiz avat e vo sevenet ar peurgevreadekaat ha diazezet e vo neuze ar bed war ur gelednadurezh wironiel nevez, disheñvel kaer diouzh hini ar gevlaouriezh hag ar varksouriezh.

Evel ma lavaran e deroù al levr-mañ : kondaonet eo an denezh d'ar youl-vat mar fell dezhi trebadout."

Riezoù evel re Europa zo re vihan hiziken, pa gomzer e termenoù brezel diavaez, evit klask, diouzh un tu, gourlakaat o lezenn war bobloù amezek dezho ha, diouzh un tu all, evit gwarantiñ o diogelroez, mar c'hoantafe riezoù brasoc'h nann-europat o lonkañ. Lusker ar youl-vat rakveneged a vo, moarvat, ar gevamzalc'hiezh a yelo war greskiñ, o tevoudañ brasoc'h-bras kengrediezh etre ar pobloù. Seurt mennozioù ne lavaront ket emichañs ne vo ket ur brezel-bed etretaluad rak, mar chom broioù Europa divarrek a-walc'h e seurt keñver hiziv an deiz, n'eus den hep gouzout ez eus, da vihanañ, div pe deir riez vras dre ar bed hag a ve barrek, siwazh, da hadañ reuz adarre a-raok ma c'hallfe bediz tañva madelezhioù ur marevezh didrubuilh da badout. Houmañ avat zo ur gudenn all. Hogen pezh na c'halla ket lod riezoù seveniñ war dachenn ar brezel diavaez, e vo tu dezho, na petra, dre hantererezh 'barbouzed' a bep gobari, d'ober war dachenn ar brezel diabarzh, war-bouez derc'hel bev pep feulster gourzhkevreadelour. Setu perak e pouezan kement war an hentennoù nevez a vo ret deskiñ d'ar poblañsoù evit herzel gant berzh enep d'd'ur speredegezh risklet da drebadaout evel frouezh ar c'hozh politikerezh naontekvedik.

Tra naturel eo da gement pobl a zo kaout ur Stad hag ur riegezh. Hogen pezh a vefe dinatur evel ma lavaran (p.97) "e vefe gwelout lod Stadoù o virout dreistbeli, eleze, hollveli pe, mar karer, diharzveli war bep tachenn, e taraz da hadañ dizurzh adarre dre: ar bed ha da vountañ ar re all d'ober evelto, dres evel m'emañ kont hiziv an deiz. Rak dreistbeliezh ar falsriezoù an hini eo a zo bet, hag a zo bepred kiriek d'an dizurzh strewet e pep stumm war an douar. E-skeud savelañ ha mirout an'urzh', evel ma lavar o meulerion douet, ez eo hadañ dizurzh don e ra dreistbeliegezh ar falsriezoù. Hepgouzout da nikun, evel reizh ! Hogen, plaen ha plarik, hep an disterañ stroñs, e vez pep falsriez o silañ pistri e kalon ar gevredigezh. Ha droukreizhiadoù anezho, ned eo evito brezelioù evel hini 1914 netra e gwirionez e-skoaz an dispac'higoù a vez graet enep dezho war ar straedoù... Gwell ganto, moarvat, koll milionoù a dud, evel da geñver ar brezelioù-bed diwezhañ eget gouzañ e ve lazhet tri den e fo ur c'hadabuilh kevarzhidik, tra zister a-walc'h ent ergorel, hogen risklus-bras evito, pa vez evel ragarouez o marv-int ha dismantridigezh ar frammoù euzhik bet savet ganto." Setu perak e vo ken talvoudus evidomp kaout atav ganimp Ensavadurioù dindan hon dorn, daoust d'ar pezh a lavar K.L. evit disoc'hañ gant e vurutelladenn.

VI. ENSAVADURIOU

"Beziadus eo evelkent" emezañ (p.145)
 "e vefe diazezet a-benn un nebeut kantvedoù un doare kempouez en un hollved kanttroet, hogen daoust hag ezhomm a vo eus ul lezenn skrivet hag eus Ensavadurioù evit gwarantif ar c'hempouez-se ? "

Plijusoc'h kalz e vefe dimp, moarvat, tremen hep Ensavadurioù dindan'un nebeut kantvedoù'. Ha marteze e vo ken glan an denelezh a-benn neuze ma vo tu da vevañ hep lezenn ebet... Iskis a-walc'h eo koulskoude seurt mennoz gant K.L. Ken ma n'ouzon dare bremañ piv ac'hanomp, eñ pe me, zo ar muiañ

troet gant ar wellaouriezh hag an'utopegezh' pe, da vezañ plaenoc'h, gant an 'difetisted'. Ha padal em eus diskouezet e chome stok va zreid ouzh an douar pa zisklerian va soñj gant ul lavarenn evel an hini da heul (p.171) : "...betek fin ar bed ne baouezo ket buhez mab-den da vezañ takonet gant prantadoù-drougiezh ha prantadoù-madelezh."

Setu perak, hep sellout keid-all en dazoned, e kav din ez eo gwelloc'h, forzh penaos, aozañ skouedoù kreñv evit parraat ouzh kement taol ganas a c'hallfe a-walc'h kouezhañ warnomp en ur marevezh tostoc'h.

Dre hentennoù bonreizhel, dre hentennoù dinazel ha neket politikel eo e kendalc'ho ar gevangevreadelouriezh da ren he stourm evit mirout na c'hallfe c'hoazh 'an tuadur-mañ-tuadur,' gouez din p.156, disoc'hañ, dre balvatadurioù, antelleriezh hag itrikoù liesseurt WAR SAVIAD AR RIEZELOURIEZH a chom, en un douez, eienenn ha frouezh pep droug e par ar Gevredigezh. "Gwarantiz rezid eo an Ensavadurioù. Gant se, n'eo ket evit mann em eus deskrivet en un doare ken resis ha ken fetis arc'hwelerezh ar Vonreizh Kevreadel. N'eo ket avat ne vern peseurt Bonreizh a zo da ijinañ. Bezañ diogel eo, moarvat, brasañ perzh an Ensavadurioù. Hogen evito da vezañ diblegus diouzh ret, e tleont ivez bezañ denek ha, dreist-holl desavidik ha dioreüs. Rak, gouez din (p.48) : "kentañ dlead pep kevreadiezh zo mont gant hent ar furnez hag ar boellegezh evit kendrec'hiñ a-raok pep tra."Hag evel ma lavaran c'hoazh (p.146) : "ne vo trec'helezh da vat gant an dinazelerezh, e termenoù ar gevangevreadelouriezh, nemet pa vo kengej etre mennoud pep ensavadur ha mennoud ur bobl diorreidik ha kerreizh, ur bobl stummet, sklerijennet. "Pezh na c'hoarvezo, anat eo, nemet 'e stern unanadoù bihan riek' (p.147),"eleze Stadoù bihan emveliek dindan ren ar gevangevreadelezh. N'eo ket evit mann, ken-nebeut, em eus displeget kudennoù pouezek e dibenn va levr, diwar-bouez notennoù fonnus a vefe matlenn

ivez gant brasoc'h aked, darn anezho, da vihanañ.

Gwan eo evit bremañ emichañs niver ar gevreadelourion wirion dre ar bed. Gwanoc'h c'hoazh niver ar gevangevreadelourion gristen. Ha padal ez on techetoc'h-techetañ da grediñ n'eus nemet gant ar gevangevreadelouriezh kristen ha kenelour e vo diluziet kudenn Vreizh e pep keñver. Ouzhpenn maz eo diwar ur vro evel Breizh, kemeret da blanken-lammat, e c'hallfed ivez diluziañ kudenn broioù all, zoken un tamm brasoc'h egeti, er c'hantved nesañ. Ur gellennadurezh c'houbarel d'hon bro e vefe neuze seurt kevangevradelouriezh. Krediñ a ran ez eo graet ar speredegzh vrezhon evit ar gevreadelouriezh rikañ. Perak ne ziwane ket e Breizh neuze traoù ken pouezus, ken krennus evit Europa ha maz eus diwanet e Hellas an henamzer ?

JIL E W A N

=====

NOTENN

Gerioù diaes ar pennad-mañ a zo da gavout e-barzh oberenn Jil Ewan hec'h unan embannet niverenn 67-68-69 IMBOURC 'H. Notomp hepken amañ e talv an droienn "betek-evel" e galleg "en tant que tel".

Hor c'henskriver K.L. a resizo e savboent e-barzh niverenn a zeu ar gelaouenn. O C'hor-toz pedomp hol lennerion da adlenn oberenn Jil Ewan a zellez bezañ studiet a-dost.

+++++

Liestennet gant ar gelaouenn Ar rener : Y.Ollivier.
CPPP : 50 015

